

Gwillou Jean-Marie (Kleder 1830 – Penmarh 1887).

Beleg.

Buez sant Theodor, patron an hostizien (1871). Adembannet e 1922 : Christo patron an ostizien (1922)

Skeudennet gand René Roy.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Taolenn

Ar Gelted er Zav-heol. (gand Vallée)

An Aotrou Gwillou (gand J. M. Perrot)

Pennad kenta : Penaoz e teuas an urz da laza ar Gristenien : I. Dioklesian.

II. Ar sakrifis.

III. Priska, an impalaerez kristen.

IV. Galerius.

V. Galerius a ziskar iliz Nikomedi.

VI. An urz heskinerez ; Zenon c'hoaz.

VII. Eun eil urz heskinerez gwasoh c'hoaz.

Eil pennad : Kristenien Ankura : I. Kristenien Ankura, kêrbenn Kelted ar Zav-heol

II. Ar Banvez.

Trede pennad : An ostaleri : 1. Theoteknus o prienti an heskinerez ; Davus.

II. Davus o tegouezoud en Ankura.

III. An ostiz santel.

IV. Davus ha Tehodot.

V. Marvaillou etre Davus ha Viktor

VI. Davus, Viktor ha Theodot.

VII. Taolennou Veronik.

TAOLENN AN TRI DEN YAOUANK

DLEAD EUN TAD HAG EUR VAMM GRISTEN

TAOLENN AR PROFED DANIEL

VIII. Davus ha Viktor adarre

Pevare pennad : Ar verzerien. I. Theoteknus en Ankura

II. Viktor ha Theodot.

III. Viktor ha Davus.

IV. Maro Viktor.

V. Krizder ar baganed.

VI. Stad truezuz Kristenien Ankura.

VII. Theodot a chom dispont.

VIII. Eun ostaleri deut da iliz.

IX. Istor vurzuduz Konstantin.

X. Davus tennet euz e vengleuz.

XI. Veronik ha Theoteknus.

XII. Merzerenti Veronik. Paour-kêz Davus !

XIII. Theodot hag ar beleg koz Fronton.

XIV. Merzerenti ar seiz gwerhez.

XV. Theodot o klask korvou ar seiz merzerez

Pemved pennad : Merzerenti Theodot. Theodot gwerzet gand eun treitour

II. Merzerenti Theodot.

III. Penaoz e oe sebeliet korv sant Theodot.

.

Ar Gelted er Zav-heol

An oll Vretoned desket o-deus klevet ano a Senkyewitz, eur marvailler poloniad brudet, en-deus displeget, en eul levr, eun daolennad dispar euz amzer an impalaered roman a heskinas ker kriz ar gristenien genta. Ar pezh n'ouzont ket, avad, eo ez eus bet e Breiz-Izel eur skrivagner, an aotrou 'n abad Guillou, par da Senkyewitz da daolenni amzeriou kenta ar Gristeniez. Treh da Senkyewitz e oa zoken or henvroad, dre ma verve en e greiz eun ene kristen ha breizeg ; ha, gand se, en-deus gouezet en em vired diouz an taolennou hudur a gaver bep kammed en istor ar Romaned pagan hag en-deus Senkyewitz roet re vraz leh dezo en e skrid. Diwar an darvoudou a skeudenne, an abad Guillou en-deus tennet, ouspenn, kenteliou kaer-dreist a vuhez kristen. Diêz e ve, e gwirionez, kavoud levr all ebed dudiusoh eged hemañ ha kenteliusoh war eun dro !

Sant Theodot a oa genidig euz eur vroad anvet Galatia, a oa bet savet en Azia-Vihanna gand ar Gelted, on Tadou-koz. Er bloaz 278 kent or Zalver, eun armead anezo a oa eet du-hont, dedennet, war a lavar an Istor, gand brud-meur kêr Droja. Hogen, o veza m'oa bet diskaret Troja pell-pell a oa, ne gavjont nemed dismantrou hag... a zo gwaz, enebourien a bep tu ! Ma rankjont en em repui er menezioù a ra keinenn an Azi-Vihanna. Ar Romaned, d'an diweza, a lamas diganto o frankiz, nemed derhel stard a rejont d'o Yez keltieg, d'o Gizioù reiz ha d'o Gwiskamañchou kaer. Testeni a zo diwar-benn-ze, a-berz sant Jerom, evid ar Yez, a-berz Cicero, ar breutaer oll-vrudet, evid ar gizioù (*pro Deiotaro*), hag a-berz Tertullianus (*de Pallio*), evid ar gwiskamant.

Diouz skwer Theodor e welot, ouspenn, pebez kristenien e teujont da veza pa oent bet kelennet war an Aviel gand sant Paol.

Evel an Tadou, dalhom bepred, daoust da bep tra hag oll a-unan, d'or Yez ha d'or Spered keltieg ha d'or Feiz kristen !

F. Vallée

Moulet eo bet al levr-mañ evdi ar wech kenta e 1871 ; advoullet e oe, goude, e 1913 war Groaz ar Vretoned. Advoulladur Kroaz ar Vretoned a room amañ, reizet ma'z eo an doare-skriva anezañ diouz reolennou Emgleo Ar Skrivagnrien ha Breuriez-Veur (pe Akademi) ar Brezoneg.

An Aotrou Gwillou

(1830-1887)

An Aotrou Gwillou, mab da Brijant ha da Izabel Kaer, a oe ganet en eun ti-soul hag a zo c'hoaz en e zav e Kerfiad, en arvor Kleder, d'an 2 a viz Kerzu 1830. Badezet e oe antronoz gand an Aotrou Got, person ar barrez ; Yann Willou ha Jann Kaer a oa ouz e zerhel hag eñvel a rejont anezañ Yann.

Tri breur en-devoa : Olier, Saig ha Visant, ha teir c'hoar : Maria-Anna, Marharid ha Loeiza : eñ 'oa ar yaouanka. E dud, heb beza en o leve, a oa eun tiegez mad ganto hag a oa en o êz ; savet e oe ganto evel ma ouezer c'hoaz sevel bugale, e meur a leh, e Breiz-Izel, a-drugarez Doue, ha desket e oe dezañ ez-vihanig, kared Jezuz hag ar Werhez.

E vugaleaj a dremenas en êr vad ar mor braz o redeg hag o c'hoari diskabell ha diarhen war drêz gwenn an aochou.

Eun eontr beleg en-devoa hag a oa person e Plouvorn : an A. Kaer. Hemañ a gemeras anezañ en e di adaleg e bemp bloaz, ha, pa oe brasohig, a gasas anezañ da skol ar barrez, e-leh ne veze greet nemed Yannig ar presbital anezañ. Euz a skol Blouvorn, ar paotr, ha ne zeske nemed ar pez a gare, a oe kaset da skolach Kastell-Paol hag er bloaz 1849, eur bachelour anezañ, e teue d'ar gêr gand ar priz-enor kenta. Daoust ma n'en-devoa desket nemed brezoneg war varlenn e vamm, an dra-ze ne vire ket outañ, d'e naonteg vloaz, da veza ar barreka euz oll baotred e vro, zoken war ar galleg.

Daou viz goude edo e kloerdi Kemper, ha d'an 2 a viz Mezeven 1855, e oe beleget. Anvet e oe raktal da gelenner e skolach Lezneven ha, daou vloaz goude, da rener skol vraz Plougerne e-leh ma chomas pemp bloaz. D'ar 14 a viz Gwengolo 1863 e oe anvet da gure e Hañveg ; d'an 18 a viz Eost 1865, da gure e Lanhouarne ; d'an 30 a viz Mae 1870 da berson e Lok-Maria Kemper ha, d'an 21 a viz Meurz 1872, da berson e Penmarh e-leh ma varvas, d'an deiz kenta a viz Gwengolo 1887, goude beza diwasket poaniou skrijuz, kaset d'ar bez d'e 57 vloaz gand ar hrign-beo en e deod tapet gantañ diwar e gorn-butun a gare re en oll.

Bez' e oa bet en e amzer eur mestr-skol euz ar re wella, eur beleg euz ar re zantella hag eur skrivagner euz ar henta ha lezet en-deus war e lerh oberou hag a bado keit hag or bro.

Mestr-skol Plougerne

Daoust ma'z eus nao bloaz hag hanter-kant abaoe m'en-deus kuitaet Plougerne, e heller, a-bouez komz gand ar re a zo eet en tu all d'o deg vloaz ha tri-ugent, klevet ano anezañ c'hoaz.

N'eo ket ankounac'haet, a hellit kredi, gand hini euz ar re a zo bet er skol gantañ.

Yvon Abjan eo a veze bepred da dosta d'e vureo ha, pa veze eur gevridi bennag da ober, eñ eo a ranke bale atao, moarvad dre ma oa al lemma e lagad hag ar skañva e harr.

An Aotrou Gwillou ne ree ket evel an darn-vrasa euz ar vistri-skol bremañ a zo atao gand o galleg hag i, gwella ma'z int en doare-ze da netra eo da zalla ar Vretoned vihan ; lakaad a ree e baotred da vond euz ar brezoneg d'ar galleg, hag euz ar galleg d'ar brezoneg, hag evel-se eo e tigure o sperejou hag e lakae sklêrijenn da darza enno, souezuz !

An hini a oar ervad diou yez a zo pinvidikoh evelato eged an hini na oar nemed eur stlabez hini, hag an hini a vale war e ziou harr a ya pelloh da goueza, kaer a zo, eged an hini na fell dezañ bale nemed a-garrig-kamm !

An ti ma ree skol deom an Aotrou Gwillou ennañ, eme Yann Wegwen, eo an hini ma reer skol dizoue¹ ennañ bermañ ; kaled e ranke beza ouzom a-wechou, rag gwall-draou e oam ; med kalon vad en-devoa ha deski a reem gantañ. Er porz koulz hag er skol atao e veze diskabell ha lavared a ree deom aliez : « Ma fell deoh beza yah, dalhit atao yen ho penn, hanter-leun ho kov ha tomm ho treid ! ».

Da zeski soniou ha peziou-c'hoari deom e oa eur mestr !

Paotred an arvorioù o-deus brud da veza gwasoh eged ar re all ; an Aotrou Gwillou en-devoa bet tro d'o anaoud e-pad ar pemp bloaz m'oa bet oh ober skol dezo hag e paotred vihan Plougerne eo e

¹ skol dizoue : eur gwir brezel a oa en amzer-ze a-berz an Iliz katolik a-eneb ar skoiou laik (skol an diaoul).

soñje, da gredi eo, pa skrive e Buhez Sant Theodot ez eo êsoh d'eur paotr-saout lakaad e loened da beuri broenn egeg ne deo d'eur mestr-skol lakaad bugale a zo da zelaou e genteliou.

Person Penmarh

P'edo kêr Bariz o tivogedi c'hoaz goude brezel 70, lakaet an tan enni gand an dispaherien, an Aotrou Lezeuleuc, vikel vraz Kemper, eur gwir-vreizad, a bedas an Aotrou Gwillou, person neuze e Lok-Maria, da ober eur werz war drubuillou ar Vro ; ne oe ket pell na dale ma klevas ar barz o tond da gana dezañ *An Dasprener*. An Aotrou Lezeuleuc a jomas sebezet o kleved ar werz-se greet ken dillo ha ken kaer hag a yeas da gaoud an Aotrou Sergent : « Aotrou 'n Eskob, emezañ, speredeka beleg a zo en hoh eskopti eo an Aotrou Gwillou, person Lok-Maria ; en eur barrez ema aze hag a zo kalz re vihan dioutañ ! »

E gwirionez, eun nebeud miziou goude-ze, person Lokmaria a oa anvet da berson e Penmarh.

Endra ma chomas e Plougerne, e vrasa preder, na petra 'ta, a oa gand e skol ; ne ree ket nemeur a dra war-dro an iliz : koulskoude e welom c'hoaz, pa zellom piz ouz ar paperou koz, e reas seiz badeziant ha Mari-Jann Arzur he-deus soñj e veze o kovs d'ar goueliou braz ha bep sul kenta 'r miz. Dorn a roe en doare-ze da veleien ar barrez ; med e Penmarh, dreist-oll, eo e roas amzer d'an dud da anaoud pebez beleg a oa en o zouez. N'oa ket eun den e vije êsoh tostaad egetañ ; daoust da ze, eun teod fall bennag - n'ouzon ket ha n'edo ket zoken e Hañveg, neuze c'hoaz, - hen diskulias eun devez d'an Aotrou 'n Eskob evel eur beleg hag a oa eun tamm re flemmuz en e gomzou. An Aotrou Serjent a vennas kredi hag a skrivas dezañ : « Quand vous aurez corrigé quelques aspérités de votre caractère vous pourrez rendre de grands services à votre diocèse ! » Kaledig e oa ar varnedigez-se a zouge warnezañ an Aotrou 'n Eskob, med evel ma lavar an Aotrou Koz, person Pleiben, bet amezeg person Penmarh e-pad pemp bloaz, ne helle beza douget nemed gand unan ha na anaveze ket a-walh an Aotrou Gwillou ; ar bersoned en-devoa bet e Hañveg hag e Lanhouarne, an Aotrou Kerloc'h hag an Aotrou Leon, n'oa ket eur brao bemdez beza en o zerr ; an Aotrou Gwillou, avad, daoust peger kasauz e veze a-wechou ar pezh a gleve, a jome atao en habaskter, ha ma klaske farsal eun dro bennag, ne glaske morse glaza ; e Penmarh e oa ker mad ouz an oll ma n'en-devoa ket eun enebour.

Ma oa deuet da veza eun den evel-se ez eo dre ma oa eur beleg hervez kalon an Aotrou Doue ; braz 'oa e zevosion d'Or Zalver e sakramant an Aoter.

Evel ar hoar dirag an tan,
Dirazoh, Jezuz, e teuzan,

a skrive en unan euz e ganaouennou. Kared a ree ivez ar Werhez, evel eur bugel e vamm ; dudi a gave o tarempredi he chapelou. Itron Varia Rumengol, Itron Varia ar Follgoad, Itron Varia Lambader, Itron Varia Tremenou, na pebez teskad gwerziou kaer ha ne gosaont tamm, na pebez briad lili, arhantet o deliou, ha ne weñvint biken, en-deus kutuillet da fuilla e-barz ho treid benniget !

Embanner braz ar binijenn, e baeron an Aotrou Sant Yann, an Tad Santel ar Pab, sturier an Iliz, ne vezent ket ankounac'haet gantañ kennebeud hag an devosion en-devoa evito a dremene e kalonou ar re a gano ar hantikou kaer en-deus savet warnezo.

Daoust dezañ da veza o veva hanter-amzer, dre e spered ha dre e galon, gand tud ha traou ar bed all, ne ankounac'hae ket evid an dra-ze ankeniou ar bed-mañ.

Ez-yaouank e oa mad ouz ar paour ; Frañseza Bossard, euz a Blougerne, he-deus soñj da veza bet digantañ he dillad kenta da vond d'an overenn hag ouz o rei dezi, an Aotrou Gwillou, a lavare : « Ar re-mañ a gavez brao ; med pa ri da Bask kenta az-pezo diganen eur gwiskamant kalz bravoh c'hoaz ! »

Dre ma kosae, e garantez evid e nesa ne ree nemed kreski mui-oh-mui ; n'en-devoa netra evitañ e-unan, ha daoust d'ar skridou aour a goueze diouz e bluenn, goullo e veze e yalh dalhmad, atao.

Heb pehed, heb arhant hag heb dle, evel-se e veve hag evel-se eo e felle dezañ mervel.

Rei a ree, dre bevar horn an eskopti, aluzenn e gomzou a oa eun drugar beza ouz o zelaou ; da zisplega reolennou ar mision, dreist-oll, n'en-devoa ket e bar : « En e brezegennou, eme an Aotrou Koz, e lakae kemend a draou tennet euz ar Skritur Zakr, ma roe tro d'ar re her hleve da gredi e ouie anezi, penn-da-benn, dindan eñvor, koulz hag e Bater. »

Anaoud ha kared a ree e barrezioniz ha kaer e oe kinnig parreziou nevez dezañ gwelloh eged an hini m'edo enni, ne oe ket gellet e lakaad d'en em zistaga diouz Penmarh : ganet e-tal mor Leon, e felle dezañ kaoud e gavell-bez e-tal mor Kerne !

Barz Breiz-Izel

An Aotrou Gwillou a stagas abred da ober soniou ha gwerziou : p'edo e Plougerne, beleg yaouank, e savas *Son ar vilinerien* hag a zo sanaillet marteze c'hoaz e spered unan bennag euz e vugale-skol.

E blijadur a oa gweled ar re goz, komz ganto, deski ouz o hleved ar brezoneg mad a rede euz o genou ker sklêr hag an dour-eienn euz ar stivell : « Eur zulvez, eme Ber Ollivier, expert e Lanhouarne, a zeskas gantañ *rosa, la rose*, - eur zulvez goude lein e doare ma'z edo ar hiz, ar vamm-goz, ar vamm hag ar vugale a oa eet da lavared ar Rozera da Bark al leur, rag en hañv edod ha tomm e oa, hag eh en em gavas an Aotrou Gwillou a-greiz m'edom gand or pedenn a-zevri ; 'dal m'her gweljom e savjom en or zav, med eñ a buchas hag a lavaras d'ar re all puchad ivez ma hellje lavared ganto ar "*Maria Mater*". - Goude e savjom en or zav, med ar vamm-goz a oa gwidre enni hag an Aotrou Gwillou da lavared dezi ker brao ha tra : « Sellit, Mari Jann, (he ano 'oa), tapit ar bokadig rezin-mañ ha kemerit eur rezinenn anezañ da houde d'he has d'an traoñ ha kemerit eur rezinenn anezañ bemdez war yun ; evit ivez eur banne dour-feunteun diohtu da houde d'he has d'an traoñ, hag ho spered, e-leh beza debret evel bremañ, a deuio da veza war e du ken habask ha ker kuñv hag hini an êl uhella a zo er baradoz ! » Med ar vamm-goz a zorohe atao hag hi da lavared d'an Aotrou Gwillou : « C'hwi n'ho-pezo ket a chañs oh ober goap euz ar re goz ! » - « O ! mamm-goz, eme an Aotrou Gwillou, chañs, me ? N'ouzoh ket 'ta ez on ganet e bloavez ar steredenn lostog hag an dud a zo ganet er bloavez-se n'o-devez chañs ebed, anez da ze, e hellit kredi, ne vijen ket bet bremañ e Lanhouarne ! »

Ma kare hegal ar re goz, hegal ar re yaouank a gare muioh c'hoaz. Eun dro, eme Ber Ollivier, en-devoa kaset an daou gurust, d'an deiz kenta a viz Ebrel, da glask binviou da denna an higennou euz a henaouiou ar pesked. Eur bloavez all en-devoa kaset eur paotr pemzeg pe c'hwezeg vloaz da ober tro ar vourh da glask daou wennegad komprenzon hag er fin unan bennag en-devoa lavaret dezañ mond da gaoud an Aotrou Gwillou : « Hennez en-deus da bresta, ha goude ma rofe eul lodenn vad dit euz ar pez en-deus, e chomo atao gouizieka den a zo e Breiz ! »

Eur wech all e kavas daou baotr yaouank, kounnar enno, oh en em lopa, ken a strake ; beteg ar gwad ez eent ; an Aotrou Gwillou o weled petra 'dremene, heb beza re vraz e oa krenn-mantruz, a deuas d'ar red, a gemeras unan euz ar baotred e peb dorn hag a stokas anezo an eil ouz egile, evel diou banezenn ; pa gave dezañ en-deveze hejet a-walh an daou ganfard, e tiskrogas diouto, e lakaas anezo da bokad an eil d'egile : « Ha bremañ, paotred, emezañ, it pep hini gand e hent ha bezit mignoned vad hiviziken, rag, pa ne vezer ket kreñvoh egedoh, ne deer ket da glask en em ganna. »

En eur vond hag en eur zond evel-se dre douez an dud, en eur zelaou o homzou, en eur evesaad ouz o oberou, eo e kave peadra da ober e varzoniezou ha setu petra 'ra dezo beza ker c'hwek ; barzoniezou int hag a zo bet savet e spered eur bobl a-bez, koulz lavared, hag an Aotrou Gwillou eo ar skrivagner en-deus tapet ar stumm d'o lakaad war baper.

Er bloavez 1865 e oe savet *Feiz ha Breiz*, eur gazetenn hag a oa brezoneg penn-da-benn ; moulet e veze e Kemper ; adaleg ar bloavez kenta, an Aotrou Gwillou a skrivas enni ; e Hañveg edo c'hoaz pa gasas dezi *Tad koz da zul, ar C'hoarierien voulou ha buhez Sant Matilin*.

E-pad m'edo e Lanhouarne e reas *Ael mat hag Ael fall, an Anevaled klañv gand ar vosenn ha Kantik ar Pab*.

Er bloavez 1870, evid ma vije muioh e tro da harpa *Feiz ha Breiz*, an Aotrou 'n Eskob a anvas anezañ da berson e Lok-Maria ; e-pad daou vloaz ma chomas eno e savas *Foar ar godellou toull, Huñvre Yann ar C'hloher, an diaoul prezegeger, Mamm al letanant, ar Gwenilied, an Dasprener, Merhed kristen Breiz-Izel, ar Zakramant, Skeudennou ha promesa* ha, dreist-oll, *Buhez sant Theodot*, patron an ostizien, a oe moulet a-bennadou war *Feiz ha Breiz* ha greet eul levr ganti eun nebeud miziou goude-ze.

E-pad ar pemzeg vloaz ma oe person e Penmarh, azezet aliez war leton an Dorchenn, trouz ebed endro dezañ nemed hini ar mor braz o tarza war gerreg an tornaod, an Aotrou Gwillou a zavas kement a gantikou ha kantikou ker kaer ma oe lesanvet kantiker braz an eskopti.

*Emgleo Sant Iltud*² a voutlo ar marvaillou hag ar gwerziou-ze diwezatoh hag eul levr teo a vezo gellet da ober anezo ma teuer a-benn d'eo dastum piz. *Christo*³, al levr a embann hizio, n'eus ennañ nemed Buhez sant Theodot ha netra ken. An Aotrou Gwillou, pa zavas al levr-se, a oa en e zaou-ugent vloaz, an oad gwella evid eur skrivagner. Kared a ree e vro hag e wele e oa eur gouli speg enni hag a deue a-benn d'he has d'ar bez pell a-raog he amzer : ar vezventi. An Aotrou Broussays Saint-Marc, kenta arheskob ha kenta kardinal Roazon (1850-1878) a lavare neuze, an daerou en e zaoulagad : « O ! Bretoned, pa helloh tremen e-biou d'eun ostaleri heb ober ho tiskenn enni, c'hwil a vezo kenta pobl a zo er bed ! »

Siwaz, ne oe ket nemeur selaouet. Ar vezventi a zave atao evel eur reverzi prest da veuzi or bro ; an Aotrou Gwillou, e-leh chom da vantri o selled ouz an droug o vond war greski, a zavas evid enebi outi *Gwerz ar vezventi* hag evel ma ne gave ket dezañ en-devoa greet tra a-walh c'hoaz, rag, emezañ : « Ar vezventi evidom eo feuteun ar maro », eh en em lakaas da skriva *Buhez sant Theodot, patron an ostizien*.

Sant Theodot a oa eur Helt a gomze keltieg evel dom.

Sant Paol eo a lakaas ar Hrist da rei e bok kenta d'or gouenn ; kaoud a eure Kelted, war e hent, en Azi Vihanna : ar Halated a veze greet anezo ; abaoe ar bloaz 270 a-raog J. K. edont eno ; Ankura 'oa o hêrbenn : o daoulagad glaz, o bleo melen ha dreist-oll o yez keltieg a lakae kemm braz etrezo hag an dud all a veve en o hichenn. O vond daveto er bloaz 45, sant Paol, doktor ar baganed, ne zispennas roudou abostol all ebed ; ne oa ket eur hristen, nag eur yuzev zoken, koulz lavared, en o zouez ; degemeret a rejont anezañ evel eun êl euz an Neñv : kalon vad o-devoa, med gwas peza zo, mezverien e oant, rag sant Paol, en eul lizer a skrivas dezo euz a Gorinth, er bloavez 50, a lavar e klaskas skarza euz o zouez "al loustoni, ar gasoni, ar warizi, al laeroñsi, an hudurnez hag an oll draou all-ze a vir ar re a gouez enno da gaoud perz e rouantelez Doue"⁴.

Theodot a veve e Ankura, 250 vloaz goude ma oa bet sant Paol o tiazeza e ilizou dre eno ; en-dro dezañ, daoust ma oa meur a gristen, e weled, siwaz, tech fall ar vezventi o vleunia c'hoaz ; dre-ze an Aotrou Gwillou o skriva e vuhez a gavas tro vras da douezia ganti eur bern kenteliou euz ar re wella hag euz ar re blijadurusa da lenn.

Hanter-kant vloaz a zo abaoe m'eo bet moull leor *Buhez sant Theodot* evid ar wech kenta ; *Emgleo sant Ildud*, o lakaad skeudenni hag advoulla anezi, a ra eun dra gaer hag a raio vad da Vretoned an XX^{ved} kantved, ha, diwar dreujou ar baradoz, he oberour a skuillo puill e vennoz war haderez al levriou mad e bro ar Vretoned.

J.M. Perrot⁵

² Emgleo Sant Iltud : Notenn gand an oberour : Nevez diazezet e Kastell-Paol.

³ Christo : notenn gand an oberour : da lavared eo "evid ar Hrist" eo ar ger a verkas Theodot war mên-bez e verh Veronika, a skuillas he gwad, evel ma ra an oll verzerien. "Christo profusum sanguinem" evid anzav he feiz en Aotrou Krist.

⁴ Doue : notenn gand an oberour : Lizer d'ar Halated, V, 21.

⁵ J.M. Perrot : rener *Feiz ha Breiz*.

Pennad kenta

Penaos e teuas an urz da laza ar Gristenien

I.- Dioklesian

E penn kenta ar bloaz 303, Dioklesian, an impalaer-ze ker gallouduz ma'z oa ar bed-oll pe zindannañ pe zindan tud euz e zorn, a halvas d'e gaoud en e lez a Nikomedi unan euz a veleien ar fals-doueed hag a lavaras dezañ :

« Trouz a zo ha meneg euz eur brezel braz ; va hoant eo anaoud ar pez a dle degouezoud, pe vad pe fall. »

« Naonteg vloaz 'zo, eme ar beleg en eur stoui, e rit eürusted an douar ; ra badoh ganeom keit-ha-keit all c'hoaz !... Nemed n'ouzon doare hag on doueed a ziskuillo deoh an amzer-da-zond. »

« Perag ne rafent ket ? eme an impalaer. Abaoe peur int mad ? Pa n'o-defe skouarn ebed evid selaou pedennou ar re all, me 'gred n'eo ket en aner e vezo devet esañs ha skuillet gwad dirazo en ano Dioklesian. Ma tiskredez war va homzou, taol evez ouz ar pez ez an da lavared dit. Va zad, va mamm, a oa tud a netra ; me va-unan n'oan c'hoaz nemed eur zoudard dister pa zeuas, eun deiz, eun drouizez koz da houlenn diganen an aluzenn. Eur pezig arhant a rois dezi.

« Gwall-nebeud eo, eme houmañ, evid eun den a zo ennañ danvez eun impalaer. »

... Sebezet oll ouz he hleved, e chomen da zelled outi.

« Ya, emezi, o poueza war ar geriou ; te a vezo impalaer pa'z-pezo lazet an hoh-gouez. »

A-neuze, kaer am-boia lavared ennon va-unan : “an dra-ze a zo kaoziou brao evid tenna arhant ha suna va yalh”, n'hellen ket ankounac'haad komzou ar wrah koz. Ped gwech on bet er hoajou war-lerh ar moh-gouez ? Ped gwech em-eus o gedet en distro ? Ped anezo n'int ket kouezet dindan va hontell-eeun ? Aliez em-eus c'hoariet va buhez ouz hini an anevaled spontuz-se ha, koulskoude, ma saven eun dra bennag, edon c'hoaz pell diouz ar skabell skeduz-se a halver eun tron... Goude maro Karuz, Numerian, e vab, a oa bet greet impalaer. Kement a geuz en-devoa d'e dad ma ne ree nemed leñva. E zaoulagad, tenerraet dre an daerou, n'hellent mui gouzañv ar sklêrijenn ; hen dougen a ranked e-kreiz an arme en eun doare gwele, kloz-mad a bep tu. Petra a reas Marius Aper, e dad-kaer ? - En em zavel a-eneb e impalaer, e vab, hag e laza evid kaoud e leh ? Ar zoudarded ne ouient netra ; dougen a reent atao ar gwele war o diouskoaz, ken na oe diskuillet an torfed dre ar flêr a zave euz ar horv hanter-vrein. Hogen, her gouzoud a reer, “Aper” eo war-eeun ano ar penmoh-gouez e latin. « Mad, emeve, pa zeuas din ar helou euz an traou-ze, red eo gweled ha n'eo ket hennez an hoh a rankan da laza ! ». Kaoud a ris va fleg : Aper a oe chadennet, kondaonet d'ar maro, ha me va-unan a falvezas din skuilla e wad... « O ! heol benniget, emeve, en eur zavel va hleze, sell ouzin, ha, mar deo gwir e tlean beza impalaer goude m'am-bezo lazet eun hoh-gouez, par warnon bremañ pa ziskaran an Aper-mañ kalz gwasoh eged anevaled ar hoajou... » Diwar ar pred-se, pep tra a zeuas da vad ganen ; kuzet a-raog evel al loar-nevez, em-eus greet buan va hresk ha bremañ e paran war ar bed oll.

« Setu aze, beleg santel, setu aze va istor. Peogwir eta o-deus an doueed diskuillet din an amzer da zond pa n'oan netra ha pe na houlennen netra diouto, perag hirio, pa'z on mestr e peb leh ha pa o fedan dre henou ar veleien, e teufent da ober skouarn vouzar ? Kee ha warhoaz deus d'an templ a zo em lez. Ma ne zelaou ket Yaou⁶ ahanout, e selaouo Dioklesian ! »

Ar beleg a oa red dezañ senti ; hen ober a reas ha zoken a-greiz-kalon. Pell amzer a oa ne ouied ket petra a hoarie gand an doueed ; a-wechou e komzent ; a-wechou hag aliesoh, pe e reent goap ouz o beleien, pe eur galloud all bennag o dalhe mud. En dro-mañ, an impalaer e-unan a dlee gweled pe o galloud kollet pe an droug eet enno a gloze o muzellou. N'eus forz petra a zegouezje, ar beleg a gave e oa sur da drei spered Dioklesian ha d'e lakaad da waska ar gristeniez.

II. Ar sakrifis

⁶ Yaou : notenn gand an oberour : *Yaou*, e latin *Jupiter, Jovis*, a oa ano doue brasa ar Romaned koz gwachall ; *diziou* pe *diriaou* e oa *deiz You* pe *deiz Yaou*.

D'ar houlz lavaret, edo ar beleg braz, gand e veleien, en templ a oa e lez an impalaer. Hemañ ne zaleas ket ; dond a reas gand daouzeg soudard hepken ; daou anezo a chomas e-keñver an nor evid mired na deuje nikun en diabarz ; ar re all a yeas war bazinier an tron, pemp a-zehou, pemp a-gleiz. Dioklesian e-unan, gwisket kaer, perlez ha mein prisiuz war e vantell ha beteg war e votou, a azezas war ar skabell-ze, a oa burzuduz dre galz a labouriou fin hag ispisial dre ma oa harpet war daou zant olifant euz ar re vrasa, rag peb unan anezo a helle kaoud deg troatad hirder. En tu all edo skeudenn Yaou, pe Jupiter, war eun aoter binvidig-meurbed. Evid gwir, Nikomedi a oa e dalh Serez, mamm an ed hag al labourerien-douar. Koulskoude, e templ Dioklesian, Yaou en-doa eur reñk kenta, hag an impalaer, evid e enori, en-doa kemeret an ano a Jovius. Evel n'oa ket ar sakrifis evid an oll, hogen evid unan hepken, n'oa kennebeud degaset nemed eun ouenner. Gwenn-kann e oa dre ma tlee beza kinniget da eun doue euz an neñv ; he herniel a oa alaouret, eur baill aour a oa ivez greet dezi ; neudennou gloan korvigellet en-dro d'ar herniel a goueze war an tal ; eun doare stol a oa kroaziet war he hein. Pa oe c'hwezet an tan hag aozet pep tra, ar beleg a lavaras euz korn an aoter ar homzou ma'z oad boaz anezo : "Hoc age", taolit evez. Neuze e tiskennas ha, diwar leur an templ, e reas e govesion da anzav n'oa ket dinamm a-walh evid tostaad ouz e zoueed, e walhas e zaouarn hag e benn. Teurel a reas bleud war dal an ouenner ; diframma a reas reun diwar gern an aneval, o stlepel a reas en tan hag, evid an eil gwech, e lavaras a vouez uhel : « Nocentes profani, abscedite », an dud fall er-mêz !

Neuze eur mevel a ziskaras an ouenner gand eun taol bouhal ; eun all a zigoras prim he gouzoug, eun trede a zegemeras ar gwad en eun hanaf arhant hag e roas d'ar beleg. Hemañ a strinkas beradou a bep tu, dreist-oll war an aoter, en eur lavared pedennou.

Evel-se e oa pep tra hervez reiz ar baganed, nemed Yaou ne reas van. Kaer a oa e bedi, kaer a oa lakaad an dorn war vouzellou an ouenner, ne drident tamm ; kaer a oa zoken, teurel ar bouzellou-ze war an tan e-mesk esañs, laez ha gwin, n'oad evid kaoud merk ebed ! An tan e-unan, e-leh beza fonnuz ha sklêr, a oa glaz ha ne zave nemed evel teod moan an naered.

« Priñs », eme ar beleg, « en templ e rank beza unan bennag a zo enebour d'ho toueed. »

An impalaer a roas eun taol lagad d'e zoudarded. Oll e teuont da stoui en eur lavared : « Benniget ra vo on doueed ! »... Unan hepken, eur zoudard koz, kleizennet e zremm gand meur a daol kleze, a zalhas sonn e benn hag a grias : « Milliget ra vezint ! Me a zo enebour dezo ! »

-« Ha perag ? », eme Zioklesian, en eur zelled a-gorn.

-« Rag ne dint nemed droug-sperejou !... Evid diskouez d'ar gwir Doue ne gemeren perz ebed en ho sakrifisou dizakr, em-eus greet sin ar groaz... Ha setu perag ez eo mud ho toueed ! »

-« Kalz a nerz en-deus eta sin ar groaz ?, eme an impalaer.

« Ya », eme Zenon. Hag e tougas e zorn d'e dal en eur lavared : « An ano an Tad hag ar Mab... »

N'en-doa ket peurhreet ar zin santel ma klevjod eun trouz seh evel hini eur geuneudenn o terri... Skeudenn Yaou a zeue d'an traoñ o tiskar ar beleg, o plada an hanaf hag oh en em vruzuna he-unan.

Ar vevelien, spontet, a redas beteg an nor. Dioklesian a oa tehet diwar e dron hag a grene o weled e zoue astennet a-dammou er gwad e-keñver an ouenner. Ar zoudarded, evito da veza nehet, a chome heb flach ha dispak o hlezeier, o hedal an urz da skei Zenon, o hompagnon.

Dioklesian, avad, ne lavaras ger hag, hanter-guzet e benn gand e vantell, en em dennas en donna euz e balez.

III. Priska, an impalaerez kristen

N'eo ket brao mond da azeza dindan eur wezenn a-nevez skoet gand ar gurun hag a zo c'hoaz o tivogedi ; n'eo ket brao mond war-lerh eun tigr en e doull evid krenna e ivinou... N'oa ket bravoh mond war-lerh an impalaer.

Koulskoude, Priska, e bried, kristenez a-benn neuze, pe war an hent d'her beza, o veza klevet ar pez a oa degouezet, a gredas mond beteg Dioklesian.

Den ne viras outi ; an oll dorjou a dlee beza digor d'eur vaouez savet ken uhel.

Mestr an douar a oa en em daolet war e wele ; troet 'oa ouz ar voger evel evid klask an deñvalijenn. Pa glevas trouz, e reas eul lamm hag e savas e zorn evid barn d'ar maro an hini a deue heb beza galvet. O weled Priska, e lonkas e gomz hag e troas adarre ouz ar voger.

-« Priñs », emezi, « gouzoud a ran ez eo braz ho spered ha kreñv ho kalon... »

« Ya », eme Zioklesian, « ha prest e vo gwelet ez eo hir va breh ha ponner va dorn. Me n'on dare a be seurt gouenn eo ar Gristenien ha perag int ken strujuz. Setu nao gwech em raog ez eus bet klasket kas anezo da get hag atao e teuont da veza niverusoh. En Itali, er Spagn, e Bro-Hall, e tiwanont evel ar geot : a-veh greet eun troh, setu eun troh all ! An tan, an dour, ar vein, an ivinou-houarn, netra n'hall dond a-benn anezo. En dro-mañ e vo gwelet ! An douar-oll a hwezo ar gwad, ha ne ehanin nemed pa ne vezo mui eur penn kristen ! »

-« O ! va mestr ha va fried », eme Briska, « poan a ra din kleved ho komzou ! Mar deus⁷ kalz kristenien, livirit din hag ez eus hepken unan anezo a hellfeh da damall ? Kaset ho-peus d'an arme spieren anvet "frumentarii". Ar re-ze, o rei e varn da bep hini, a oa karget da zelaou ar marvaillou ha da weled ha feal e chome ar zoudarded. Kalz o-deus kavet war var da gosteza ha da drei en hoh eneb, nemed, en o zouez, n'eus bet morse eur hristen. Mar chomit ker pell ha ker stard war an tron-mañ, diskaret ken aliez e-pad kant vloaz, petra 'zo kaoz ?... An niver euz ar gristenien ! Karoud a reont ahanoh dre ma'z oh just ha leal, ha bremañ c'hwi a yafe d'o laza ? »

-« Gwir eo », eme Zioklesian, « gwir eo. N'hen nahin biken, n'eus na gwelloc'h na lealoc'h soudarded ! Nemed n'hellan ket, koulskoude, tenna warnon drougrañs on doueed. Mud e chomont, koueza a reont, frigasa a reont o beleien, hag ar gristenien o-unan a anzav ez int kirieg a gement-se. Re vad on bet beteg hirio ! Setu dirag va daoulagad e saver, e Nikomedi, ilizou da Jezuz-Krist ; setu, em falez zoken, ez eus kalz a gristenien, ha te da-unan ne vezez mui gwelet en templou, na va merh Valeria kennebeud. Perag 'ta em-be galloud, ma n'eo ket evid diwall va relijion ? Piou a dle kaoud mez o veva er memez kredenn ganen-me ? Penaoz, ar penn euz ar bed-oll a stouo dirag Jupiter, hag eur sklavour, eur zoudard, n'her graio ket ? Êz eo d'ar gristenien senti. Ma chomont aheurtet, gwaz a ze dezo ! Ne zellezint nemed ar maro, hag ar maro a gavint. »

Ne dalveze ket da Briska klask diskouez d'an impalaer ez eo gwelloc'h senti ouz Doue eged ouz an dud ; hag e rank peb unan gouzañv ar maro kentoh eged nah e feiz. Dioklesian a oa pagan, ha n'en-divije gwelet netra er homzou-ze. Priska en em dennas, anad dezi e oa c'hoaz kalz a zroug en impalaer, nemed kredi a ree e teuje war e heriou kenta. Tehed a reas 'ta, en eur drugarekaad an Aotrou Doue.

Antronoz e oe roet an urz-mañ a-berz Dioklesian : « Soudard ebed, nag em lez, nag e Nokodemi, n'en-devezo ket doueed nemed ar re a ra mil vloaz 'zo nerz hag evurusted or bro. »

N'oa ket eta, evid ar gristenien, kemend a hlaz hag a helle beza, hag ousspenn, fiziañs a oa na vije ket dalhet d'an urz-se. Rag Dioklesian a oa eun den hag a droe buan a-walh, ha ne ouie ket atao petra a hoantae. Evel-se, e Nikomedi, e lavarje eun deiz : « Savit amañ eun templ, grit amañ eur palez », ha, pa vezent greet, e ranked o freuza diohtu, rag lavaret e veze : « Gwelloc'h e ve planta gwez evid rei disheol d'ar valeerien, sevel tiez-skol ». Hag e oa red dispenn al labour.

Koulskoude, en dro-mañ, e fazied pa greded n'oa an urz-se nemed ar frouez euz eur barrad kounnar a dorje abred dirag Priska. Meur a zoudard a oe merzeriet hag, ispisial, eun ofiser anvet Per, gand e oll gompagnunez. Eur wec'h ma'z a an den war an hent fall, ez eo diêz dezañ chom a-zav. An diaoul a zo lemm ha stard e skilfou ; pa roer an disterra krog, e peg mad. Eur roue, dreist-oll, a dle lakaad evez ; kavoud a ra atao tud d'e vounta, da lavared dezañ eo eun doue, pa ne vez nemed eun tirant.

Meulet e oe 'ta Dioklesian evid ar gwad a skuille, ha lavaret zoken e ranke kaoud eur galon gwall-dener evid chom heb lakaad beh war an oll gristenien. Aon a oa o komz re frêz, rag ne ouied ket war-eeun petra a oa o wiri e penn ar mestr. Krozmolad hepken a ree ar baganed ha beleien ar fals-doueed ; hogen an diaoul a gavas eun teod hag eur genou diouz e zoare.

IV. Galerius

An den dibabet gand Satan 'oa mab-kaer an impalaer, pried Valeria ha, pa ranker e eñvel, Galerius.

An hini en-deus krouet pep tra en-deus greet ivez an anevaled binimuz, ar bokedou leun a gontammou, nemed, evid ma teujem da ziwall outo, en-deus o greet euzuz ha divalo. Evid an dud ez

⁷ Mar deus : ma' eus

eo êsoh fazia ; eun ene kaer a hell beza en eur horv koant ; koulskoude, an ene a deu peurvua da bara muioh pe nebeutoh war ar horv ha, pa vezer eet don er fallagriez, an droug a laka e ziell war dal ha daoulagad an den. Evid Galerius, war beb-unan euz e izili edo ar ziell-ze. Mez e oa e weled ha, koulskoude, n'oa ket êz dezañ en em guzad, rag beza en-devoa ouspenn c'hweh troatad. Pa valee, e gov teo ha spontuz a grene evel eur geun lageneg. C'hwez fall a oa gantañ ha koulz e oa evid ar fri en em gavoud gand eur harrad teil evel gand ar ramz flêriuz-se. Marellet e oa e dal evel kein ar zourd ha krohennet e oa penn-da-benn evel eun touseg. Kredabl en-doa, pe da vihanna, en-doa bet kalz spered, rag, en e amzer genta, n'oa nemed eur paotr-saout, hag an hini en-doa c'hoant d'e lakaad da eonenna gand ar vuanegez n'en-doa nemed e eñvel "armentarius", da lavared eo "diwaller-chatal". Bremañ en-doa greet e hent peogwir e oa mab-kaer da Zioklesian ha Kezar, an eil e oll bro ar Zav-heol.

E vrasa plijadur a oa ober droug d'an dud. Beza en-doa, e-leh chas, daou ourz anvet Mikaour ha Didamall. Tud a daole dezo hag e c'hoarze o weled ar hourennadeg, an emgann etre an dud keiz hag i. Eun deiz, e teuas peorien da houlenn digantañ eun dra bennag. Edo e tu da farsal hag e reas teurel ar beorien-ze er mor don, rag, emezañ, peñsea a ra kalz listri, kalz aour a zo e goueled ar mor, ha n'eus nemed klask mad evid beza pinvidig. Anad eo en-doa an diaoul dibabet mad e zen evid ober brezel d'ar gristenien, rag a-berz Galerius n'oa da hedat na lealded na truez ebed !

Ar hezar, o veza klevet e ree Dioklezian droug d'an dud vad a Nikomedi, a oe mall gantañ dond d'ar gêr-ze evid lakaad an tan da gregi gwelloc'h ha da zevi ar bed-oll. Ne gavas ket, zoken, e oa re evitañ chom eur miz heb gwelloc'h e vignoned vleveneg, Mikaour ha Didamall.

E-pad ar goan, eta, ne reas netra nemed kuzulia an impalaer falla ma helle. Gounid a reas ivez kalz tud a zeuas da veza a-du gantañ, rag setu amañ unan euz e lavariou : pa rit vad, grit ar vad-ze hoh-unan, evid ma vezo deoh an oll enor ; pa rit fall, kemerit kuzul, evid galloud tamall ho nesa. Ne glevet eta, a bep tu, nemed lavared : « Red e ve ober an dra-mañ d'ar gristenien, red e ve ober an dra-hont. »

Dioklesian, sentuz ouz Priska, a zalhe mad ; marteze zoken en-doa keuz da veza greet re a-benn neuze ; erfin, torret e benn gand Galerius ha kalz a re all, e kasas beleien ar fals doueed da gêr Milet, evid gouzoud petra 'lavarje Apollo. An dra-ze a oa lakaad ar bleiz da varn an oan. Apollo, evel just, a respontas : « Gouzañv ar gristenien hag o Doue maro a ve gwerza war goll doueed ho pro. »

Dioklesian ne harzas mui.

V. Galerius a ziskar iliz Nikomedi.

Galerius ne hedas ket e vije skrivet nag embannet an urz da wallgas ar gristenien, re a vall en-doa da ober droug. Dirag ar palez e-unan e oa bet savet eun iliz kaer. Hounnez a oa abaoe pell amzer e goulou eun tirant hag aliez en-doa savet e zorn outi gand malloziou spontuz. Diskar an iliz a oa freuza ti oll vugale Jezuz. Dre eno e oa, eta, digeri ar brezel ouz Doue hag an dud !

An deis merket a oe an dri-warn-ugent a viz C'hwevrer, ma reed gouel eun doue pagan anvet "Term". Ar baganed o-doa doueed e peb leh hag evid pep tra : doueed en neñv, er mor, en ivern, er hoajou, er parkeier ! "Term" 'oa an hini a verke e dachenn da bep hini hag a oa er mêziou evel hirio ar mein-harz. Galerius, o kemered an deiz-se, a lavare : « An doue "Term" a vezo an "termen" diweza euz relijion ar Hrist. N'ez ay ket larkoh ! »

D'an dri-warn-ugent e teuas, eta, soudarded hag ofiserien beure-mad beteg an iliz. Terri a rejont an dorjoug hag e klaskent skeudenn Doue ar gristenien, rag kredi a reent e tlee beza eno eur skeudenn bennag, evel en templou pagan. A-daoliou bouhal e oe trohet ha torret kement tra a oa en iliz.

An daou briñs, euz prenest ar palez, a zelle ouz an taol dizakr. Galerius a hoantae ma vije lakaet an tan e ti Doue ; Dioklesian a viras gand aon da zevi kêr. Gwelloc'h e kavas rei urz d'ar zoudarded da freuza ar mogerioù hag, e gwirionez, a-benn nebeud, ne chome mui eno mên ar vên.

VI. An urz heskinerez ; Zenon c'hoaz.

Antronoz e oe staget ouz ar mogerioù an urz heskinerez. Greet e oe evel-henn :

« An daou impalaer, Dioklesian ha Maksimian, an daou gezar, Koñstañs ha Galerius, a ro ar gourhemenn-mañ : E peb leh euz an douar e vezo diskaret ilizou ar gristenien euz an neh d’an traoñ ; o levriou a vezo taolet en tan ; ar re anezo a zo er hargou a gollo o flasou ; ar re all a gollo o frankiz. »⁸

Galerius a hinas o sina an urz, rag kaoud a ree dezañ en-divije bet kalz gweloh. N’eo ket ilizou na levriou a hoantae da zistruja, an dud o-unan hag o buhez a hoantae da gaoud. An dra-mañ a oa, eta, teurel kolo dirag eun tigr, na gav mad nemed kig ha gwad. Toui a reas e kavje e bleg ha n’eo ket pennaoui a raje, eosti founnuz eo.

Ar gristenien o-unan a roas eun digarez bennag en o eneb. Ar zoudard koz, Zenon, goude ar zakrifis on-eus komzet anezañ, a oa en em guzet e kêr, n’eo ket m’en-divije aon, rag n’oa marteze nemed re hardiz. Hemañ ‘ta, a-veh m’oa staget ar skrid, a dostaas hag a rogas ar paper.

Kemeret e oe raktal ha kaset dirag an daou briñs evid beza barnet d’ar maro.

« Dioklesian, emezañ, n’eus ket pell ez-poa c’hoant da anaoud an amzer da zond ; mar kerez, me ‘gomzo dit, n’eo ket a-berz ar droug-sperejou, a-berz an Doue gwirion an hini eo. »

An impalaer, o weled war dal Zenon evel eur sklêrijenn vurzuduz, a roas urz d’ar gwardou d’en em denna ; ne chomas er gambr nemed Dioklesian, Galerius ha Zenon.

« Bremañ, komz », eme ar priñs.

« Euz an deiz, eme ar zoudard, ma skoi ar gristenien, e vezi da-unan skoet gand Doue ha n’ez-pezo mui eürusted ebed. Petra a dalv dit en em zével ouz Jezuz-Krist ? Ne welez ket ema an deiz o houlaoui hag an heol o vond da bara ? Ar priñs dibabet evid rei eun ehan d’an douar ha sevel uhel ar groaz a zo a-benn bremañ e-kreiz e nerz ha, dre ma kresko, te a gouezo. Koll a ri da dron ; roget e vezo da vantell impalaer evel m’am-eus roget da baper. Koll a ri da skiant-vad, mervel a ri a-raog mervel... Daou vloaz az-peus da ren, trizeg vloaz az-peus da veva... »

Galerius, azezet e-kichenn eur prenest uhel, a oa o skriva :

« Ha me, profed a zaou wenneg bemdez, emezañ, petra ‘zegouezo ganen ? »

« Te, eme Zenon gand eur gwall-zell, te a vezo debret ez-veo gand ar preñved. A-raog e vezi breset gand ar gristenien. Ar re-ze, o klask ar frankiz, ar sklêrijenn, a lakay o zroad war da houzoug, evel ma rin-me bremañ. »

En eur lavared ar homzou-ze, Zenon a lammas war eur hleze a oa eno en eur hogn hag a grias :

« Galerius, pleg ma pignin warnout ha ma tehin dre ar prenest !... Sent, pe out maro ! »

N’oa ket da varhata. Galerius, en eur grenna, a blegas ; Zenon a bignas warnañ buan-ha-buan, a dapas krog e barrenn ar prenest hag, en eur boueza war Galerius ;

« Setu, emezañ, petra a ray dit eun all galloudusoh egedon-me ! »

Bounta a eure anezañ, hag ar bern fank-se a yeas da ruilla e-kreiz ar gambr.

Pa zeuas ar zoudarded, edo Zenon er-mêz hag en e frankiz. Enklask a oe greet anezañ ; ne oe ket kavet, rag en em dennet e oa en eul leh ma zoñjed ket buan ennañ, e templ Serez.

Koulskoude, an devez-se end-eeun, an daou briñs a dlee ober eur sakrifis en enor Serez.

Kalz a dud a zeuas da heul. Zenon a oa sioul e traoñ an templ, e vantell war e benn. Den ne ree van, rag ar hiz a oa zoken beza mouchet evel-se e-pad ar sakrifisou. Ar gwad a verve e gwazied ar zoudard koz, o weled pedi fals-doueed. Ar beleg a lavaras evel atao : “Profani nocentes, abscedite...” « An dud fall er-mêz ».

Dioustu e klevod eur vouez hroz o lavared :

« Neuze n’ho-peus oll nemed en em denna, rag oll oh tud fall ! »... Zenon eo a gomze, dizolo ha sonn e benn.

Kemeret e eo ha barnet da veza devet raktal dirag skeudenn Serez.

« Gwell a ze, emezañ ; ar c’hwez euz ar hig kristen a zisplij muioh d’an drougsperejou eged na zisplij d’an dud ar flêr a zo gand Galerius. »

Ne lavaras mui netra, ne flachas ket zoken war ar hrill. Nemed, a wech da wech, e tigore e zaoulagad, evid gwelod, kredabl, e-kreiz ar moged, an hent a yee da gas e ene d’ar Baradoz.

⁸ Notenn : (gand “Embann an Hirwaz”) : memez mod e oa meur a gantved da houde e Frañs, gand ar stourm a-berz ar gatoliked a-eneb ar brotestanted. Devez ar Sant-Bartelemi, d’ar 24 a viz eost 1472 ; ha goude an “dragonnades” renket gand Loeiz XIV (e-noa diskaret an “Edit de Nantes », bet sinet e 1598 gand Henri IV (1685).

VII. Eun eil urz heskinerez gwasoh c'hoaz.

Galerius, goude beza kounnaret gwalh e galon, a laouennas : an traou a droe diouz e hoant. Ar gristenien a freuze ar paperou sinet gand ar briñsed ; dizoare e komzed anezo ; dispaherien e oant, eta, na hedent nemed an dro da veza mistri ha da vresa ar baganed.

Prezeg a reas ha displega kalz a draou dirag Dioklesian. Hemañ a gave fall-braz ar pezh an-doa greet Zenon ; koulskoude, e lavare, ennañ e-unan, e oa hennez eun den a galon ha n'en-doa c'hoant ebed d'en em veñji, peogwir n'en-doa ket lazet Galerius. Evel keuz en-doa d'ar zoudard koz, ker stard war dachenn an emgann.

Kent-se, e oe skrivet eun eil urz kalz gwasoh eged an hini kenta. Dougen a ree e ranke an oll gristenien pe azeuli an doueed pe vond d'ar maro. An impalaer a lavare hepken e oa mad gedal c'hoaz eur pennad a-raog embann an urz-se.

Etre daou, e teuas eur barrad-amzer war Nikomedi. Ar gurun a gouezas war ar palez hag a lakaas an tan ennañ. Dioklesian, dihunet e-kreiz e gousk, en-devoe eur spontadenn. An tan a oe lazet hag ar priñs a yeas adarre d'e wele.

Eur pennad goude, setu an tan a-nevez, ha gwasoh eged biskoaz. Galerius e-unan eo en-doa e lakaet hag a grie a-bouez-penn : « Ar grsitenien a laka malloz on doueed da goueza warnom ! Ar gristenien a hoanta on devi ! »

Ar wech-mañ Dioklesian a gredas ar gaouiad hag, ouz sklêrijenn an tangwall, a zinas an urz. N'oa pluenn ebed gantañ ; gand beg e gontell eo e sinas ha Galerius war e lerh.

Edo, eta, ar bed o vond da neuñv er gwad ; fallagriez eun den a yee da lemel an dud a-vilierou a-ziwar an douar ; hogen, en Neñv, an êlez a ree ivez kurunennou heb niver !

Galerius, greet gantañ e daol, laouen ha seder, a zistroas d'ar gêr ; mall en-doa da weled Mikaour ha Didamall ha d'o larda gand kig kristen.

Eil pennad

Kristenien Ankura

I. Kristenien Ankura, kêrbenn Kelted ar Zav-heol

Etre daou pe dri deveziad bale diouz Nikomedi edo Ankura, kêr-veur Ar Halated⁹. An dud kaloneg-se, euz an heveleb gwad ganeom-ni, o-doa evel treuzet ar bed-oll en eur zigeri hent gand o hlezeier ; kant ha kant gwech all e oant bet treh d'oe enebourien war dachennou ar brezel ; ken n'oa deut c'hoant dezo da ehana. Neuze e oant en em staget ouz eur horn-douar en Azi-Vihanna (eur vro a zo bremañ e dalh an Durked ha n'en em gav gwall-bell diouz an Douar-Santel), hag o-doa roet o ano d'ar vro-ze gounezet ganto ; anvet e oe Galatia.

Ma n'eo ket mad d'eur merour gweled siminal e vestr o tivigedi, ez oa falloh c'hoaz d'ar Halated beza amezeien d'an impalaer ha d'ar hezar didruez.

Sant Paol hag e gompagnon leal, sant Barnabas, o-doa bet ar garg da brezeg ar feiz er hosteziou-ze. Kemered a rankjont kalz poan, rag a-ouenn eo d'ar Gelted kaoud pennou kaled. Nemed piou a helle herzel ouz nerz sant Paol, ouz kuñvelez sant Barnabas ? Ar Halated a zeuas 'ta abred da veza kristenien.

Koulskoude, dre eno ez oa kalz a Yuzevien¹⁰ hag a glaskas trei an dud-mañ diwar an hent mad, rag niverusoh eo c'hoaz laeron ar wirionez ha gras Doue eged al laeron all.

An abostol braz, evid o sklêrijenni hag o startaad, a skrivas dezo eul lizer c'hwek, rust zoken, pa'z ee beteg lavared dezo e oant tud diskiant, e reent mez dezañ dre ma'z oant ken laosk. El lizer-ze, e lenned ar homzou-mañ ker brudet : "Hag e teufe eun êl euz an Neñv da brezeg deoh eun Aviel disheñvel diouz va hini, n'her zelaouit ket, livirit malloz dezañ¹¹ !" Kennerzet gand o mestr kenta, renet mad ivez gand daou eskob o-doa bet 'benn neuze ha gand sant Klemens a oa, d'ar mare, en o zouez, ar Halated, or hendirvi, a heulias war-eeun lezenn Jezuz-Krist. Her gweled a raim diwezatoh, rag e kêr Ankura eo e tremen on istor.

Evel-se, eur brezel spontuz a yee da zigeri etre relijion ar baganed hag hini ar gristenien, etre ar Bed hag ar Groaz. Komz sant Yann a zo gwirion, avad : ar re oll a zo ganet euz Doue a zo treh d'ar Bed ; ar pezh a ro deom ar gounid eo ar feiz.

Koulskoude, ar baganed a gave dezo ne vije ket diêz mouga beteg an elvenn diweza euz an tan degaset gand Jezuz euz an Neñv, rag a-du ganto edo an dud fall atao ken niveruz, ar seiz pehed marvel a zo ker buhezeg o gwriziou hag, erfin, Satan a ziver hag a zivero ar gwad dioutañ adaleg Abel beteg Henok hag Eliaz !

Sant Yann, e Patmos, a oe diskouezet dezañ eur skeudenn euz an heskinerez-se, a lavar : « Kaset e oen a spered en eur gouleh hag e welis eur vaouez azezet war eun aneval ruz-gwad ha leun a anoïou leou-douet. An aneval-ze en-doa seiz penn ha deg korn. Gweled a ris ar vaouez a oa en em vezvet gand gwad ar zent ha merzerien Jezuz-Krist, hag o weled anezi, e oan sebezet oll¹². »

Mar doa sebezet an Aviel braz, pebez spont, eta, a dlee beza en dud a yee da veza flastret dindan treid an aneval ha roget gand e gerniel ? - « Ya, eme unan euz an dud a veve neuze, ar spont a redas euz Nikomedi da Ankura ker buan hag an avel ; dizeha a reas ar gristenien war o zreid, kaoud a reas dezo e krene an douar hag e troe gand ar gwez hag an tiez... Gwelloh e vije bet ganto gweled eun armead soudarded o tond gand an tan hag ar hleze. »

Evid gwir, an neb en-deus feiz a-walh a vev war an douar evel eur beajour hag eun tremeniad : ar hleñved, ar maro, kement tra, en eur ger, a verra e veaj, a zo deut mad dezañ. Nemed, e peb amzer, eo

⁹ Ar Halated : Notenn gand an oberour : Kristenien Ankura, kêr-veur ar Halated, a oa Kelted eveldom-ni. Degouezet en Azi-vihanna goude brezelioù hir, daoust dezo da veza breset a bep tu gand enebourien, e talhjont d'oe yez, an hengeltieg, tad-koz d'or brezoneg, ken e oe souezet sant Jerom, er IV^e kantved, o kleved anezo o komz an heveleb yez, emezañ, hag an Drevired, eur boblad euz Galia ha, moarvad, hag on tadou-koz en em gave, d'ar mare, e Breiz-Veur. E-touez ar Gelted-se euz an Azi-vihanna 'zo e vevas hag e oe merzeriet dant Theodot, patron an ostizien.

¹⁰ Notenn gand "Embann an Hirwaz" : gouennelour e oa Gwillou.

¹¹ Livirit malloz dezañ : Lizer d'ar Halated, 1^a Pennad, 8^{ved} koublad.

¹² e oan sebezet oll : Sant Yann, Apokalips XVII, 3-6.

bet rouez an dud distag-krenn diouz an traou krouet ; c’hwek eo e vuhez da bep hini, ker c’hwek zoken ma halvom evurusted ar Baradoz “ar Vuhez da viken”.

Hogen, o buhez eo a houlenned digand kristenien Ankura, buhez o horv, pe buhez o ene, ha c’hoaz war hent ar bez, ken trist anezañ e-unan, n’oa nemed traou euzuz : kribinou houarn, ivinou houarn, kant ha kant tourmant, amezeien ha mignoned d’ar maro. Diêz e oa dezo ivez soñjal e vije korvou ar verzerien laosket e noaz war ar ruiou, debret gand ar chas hag ar brini. Setu petra a lakae ar Halated da grena ha peadra a oa. Er penn kenta ma oe, eta, ar freuz en o zouez, edont evel eun hed-gwenan a zo lakaet an tan en o hest ; abred, avad, o halonou, eet bihan, a zavas war-zu Doue evid goulenn nerz : « D’an iliz, emezo, deom d’an iliz ! » Ha setu-i bodet en-dro d’o eskob ha d’o beleien.

« Breudeur, eme sant Klemens, en deiz kenta, Doue a zispartias ar sklêrijenn diouz an deñvalijenn : ar skêrijenn a anvas deiz, an deñvalijenn a anvas noz. Bremañ ema o vond da zispartia an dud eeun diouz ar beherien. Ha c’hwi a chomo bugale ar Sklêrijenn, bugale an Deiz ? »

« Ya, dre hras Jezuz-Krist ! », eme ar bobl.

« Breudeur, ar pardaez a vez teñval, ar beure a vez skeduz ; ar vuhez a zo e-keñver ar maro. »

« Her gouzoud a reom ! », eme ar bobl.

« Breudeur, ar pesk a vev yah er mor c’hwero : ar hristen a dle beva laouen e-kreiz an trubuillou... »

« Amen ! », eme ar bobl.

« Breudeur, pa viot etre daouarn ar vourevien, dalhit soñj ezu komz Jezuz d’al laer dehous : “Hirio, c’hwi ‘vezo ganen er baradoz¹³... »

« Amen ! amen ! », eme ar bobl.

Neuze Klemens a zaoulinas hag a bedas pell-amzer. Goulenn a reas digand Doue ma teuje e gristenien da eva, heb fallgaloni, gwir galur mignoned Jezuz-Krist ha ma teuje o êl mad d’o hreñvaad pa vijent o c’hwezi ar gwad.

Etre daou, ar veleien, an avielerien a yee hag a zeue dre an iliz. Red e oa diwiska an aoteriou, kuzad ar haluriou, al listri sakr... Ar bobl a huanade hag a leñve doureg : « O ! Krist benniget, emezo, peur ‘ta e teuot da ren war ar bed ? » A-zioh an aoter ez oa eun daolenn gaer-meurbed ; pa oe lakaet ar skeulioù evid he distaga hag he diskenn, ar glahar a yeas c’hoaz war gresk.

Setu amañ ar pez a oa merket war an daolenn-ze : d’an neh, war eur menez, eun oan gourvezet : euz ar menez e rede peder ster war-zu peder lodenn an douar ; en traoñ, eur hraouig, hini Betleem. Anezañ e teu deñved a beure war ribl ar steriou. E-keñver an dour e save gwez palmez ; en o skeud liliennou ha, war o bodou, meur a goulm wenn. Gweled a reed ivez eur haro o teredeg war-zu ar steriou evid terri e zehed. Erfin, en dour edo o neuñv eur pesk a zouge eun dorzig vara war e gein.

Ar gristenien a ouie mad ar pez a verke an traou-ze oll. Ar peder ster a oa pevar levr an Aviel, ar pesk a zouge bara, ar Gomunion zantel.

Klemens, oh anaoud a tlee ar baganed ober o galloud evid kaoud al levriou-ze ha saotra korv On Zalver, a lavaras, en eur zevel e zorn war-zu an daolenn : « Diwallit, va breudeur, da deurel d’ar chas boued ar vugale¹⁴. »... Ar bobl a respontas : « *Sancta sanctis* ». An traou santel a zo evid an dud zantel.

« Pehini eo ar gourhemenn kenta ? », a lavaras c’hoaz an eskob.

Eun Doue hepken a azeuli,

Ha dreist pep tra a giri.

eme ar bobl.

« Mad, eme ar pastor, na deuit ket eta da ginnig ezañs d’an doueed faoz ha karit ho Toue dreist ho tanvez, ho tud, ho puhez. Dalhit soñj ez eo bet skrivet al Lezenn don war ar mên, ha neket war drêz pe boultrenn. Diou daol al Lezenn a zo anvet taolinier an testeni. Testeni a roint, eun deiz, euz ho kalon hag ho nerz dirag Doue hag e élez ; testeni a rofent ivez... Med Doue ra viro ! Daoulinit, va breudeur, stouit ma roin deoh va bennoz en ano an Dreinded Sakr. »

Ar Gristenien a blegas o fenn beteg leur an iliz ha, kennerzet dre ar bedenn ha komzou o eskob, en em dennas didrouz.

Unan hepken a jome daoulinet hag a bede atao, e verh yaouank en e gichenn.

« C’hwi eo, Theodot ? », eme an eskob o tremen.

¹³ c’hwi ‘vezo ganen er baradoz : Aviel Sant Lukaz, XXIII^{ved} Pennad ; 43^{ved} Koublad.

¹⁴ boued ar vugale : Aviel Sant Vaze, VII^{ved} Pennad, 26^{ved} Koublad.

« Ya, eme an ostiz ; pedi a ran evdi Veronig. »
« M'he-devezo ar gurunenn a werhez hag a verzerez. »
« Ha c'hwi, eme Glemens da Veronig, petra eo ho c'hoant ? »
« Va zad, emezi, c'hoant am-eus da veza c'hoar da zantez Agnez ha da zantez Agata. »
« An Aotrou, eme 'n eskob, a raio bolontez ar re o-deus e zoujañs ; selaou a ray o goulenn ha diwall a ray anezo : *Voluntatem timentium se facit et precationem eorum exaudiet et salvos faciet illos*¹⁵. » Hag e roas e zorn da bokad d'an tad ha d'ar verh.

Etre ma'z edo evel-se kristenien Ankura e-harz an aoteriou, etre ma'z edo an deñved en-dro d'o fastor, edo ivez Dioklesian ha Galerius oh eñvel ar bleiz a dlee lakaad freuz er vandenn.

II. Ar Banvez.

Abaoe m'oa embannet an urz heskinerez, Galerius n'oa ket evid padoud gand al lorh a oa eet ennañ. Lavared a rajeh en-dije gounezet eun treh braz war enebourien ar vro ; tridal a ree e gov spontuz ha briz e zremm a lugerne evel ar re a zo war gein an dluzed.

Nebeuta e halle da ober a oa eur banvez d'an impalaer ha d'e vignoned.

Koulskoude fazia a rafeh o kredi e veze niveruz an dud a azeze ouz taol ar baganed. Ne veze morse nebeutoh eged tri, dre ma c'hoanteent enori an teir doueez anvet "an teir flah koant". Morse kennebeud ne veze ouspenn seiz, rag ma'z edo e dalh seiz doue, an dañs, ar sonerez, al liverez, hag an traou all o-dije kavet hepto ar vuhez gwall-zivlaz.

Koan a oa ar pred fonnusa euz an devez, med evid koania, ne hedent ket ar huz-heol. D'ar mare-ze, n'oa ket orolajou : an dour, o koueza a-veradou en eur voestig greet gand mên sklêr, pe drêz munud o rikla war e bouez, a ranne or peder eur warn-ugent-ni en eiz lodenn a deir eur pep hini. An eur genta euz an deiz a oa c'hweh eur diouz ar beure ; koan a veze debret war-dro peder eur.

An impalaer Dioklesian, pedet gand e vab-kaer, ne vankas ket d'ar banvez. N'oa nag hir na diêz ar veaj hag, ouspenn, aon en-doa rag Galerius ; karantez en-devoa ivez evid e verh Valeria.

Setu, eta, ar hezar Galerius o pourmen e dud dre al liorzou da hedal ar pred. Setu-i, na petra 'ta ! o vond da zaludi Mikaour ha Didamall, an daou ourz kriz. Koulskoude, eur bourreo hepken a dlee kaoud plijadur o selled ouz o forz, rag, e gwirionez, n'oa nemed eur garnel.

Goude-ze, Galerius a bedas e vignoned da zond gantañ d'ar gegin. Ar re-mañ a oa souezet hag a houlenne an eil digand egile petra a helle beza eno.

Ar pezh a oa eno 'oa eur pesk, eur braog. Koustet e oa eun daou-hant skoed bennag, med petra 'ree dispignou foll d'eun den a ouie digeri yalh e nesa pa veze plad e hini ? Evid gwir, e oa ar braog-se eur mell tra ! Me n'on dare ha Yann Santeg, en-doa breou, koulskoude, evid pesketa hag en-deus antellet keid amzer war-dro Mogerieg ha Gwrah-su¹⁶, me n'on dare hag en-defe tennet euz ar mor eun heveleb pesk.

Ar braog, beo-buhezeg, a oa o neuñv hag o flipata en eur veol mên-glaz. Gwelloh e vije bet gantañ beza en aochou digor o spia an talareged, med, siwaz, tapet e oa hag ar briñsed a gemere plijadur ouz e weled o tigeri e henou braz evid kaoud e vuhez, o weled e skant arhantet o cheñch liou dre ma tostae ar maro.

Erfin ez ejod da azeza pe, evid lavared gwell, da hourvez ouz taol.

An abostol a rebeche da galz a dud ober eun doue euz o hov hag, en deiz a hirio, ne vez ket diêz kaoud meur a hini n'o-deus ken doue nemed hennez. N'ouzont ket, avad, e azeuli evel ma ree ar baganed. Petra eo leinou an dud pinvidig ? Petra eo kadoriou greet gand kolo pe raoskl ha, d'an hirra, bourret gand reun ? Petra eo ar begadou kig hag ar jelkennou tano a weler bremañ ?...

¹⁵ *salvos faciet illos* : Psalm CXLIV, 19^{ved} Koublad.

¹⁶ Gwrah-su : Mogerieg a zo eur gêriadenn euz a Zibiril ; dirazi, eur pennad er mor, ez eus eur roh vraz anvet ar Wrah-zu.

Sellit ouz ar seiz den-mañ gourvezet war beb a wele goloet gand pallennou ar haerra. O breh kleiz a zo harpet war bluñvegou, o zreid war drebezeier arhant ; ezañs an Arabi a zivoged e pep korn euz ar zal ; daouzeg sklavour yaouank a zo ouz o zervija. Dougen a reont peb a gurunenn hag ar bokedou o-deus eul liou disheñvel evid merka daouzeg eur an deiz. An hini kenta en-deus bleun melen, an eil, re wenn ; an hini a verke ar hreisteiz a oa ruz-tan e gurunenn.

En eur zal all e oa sonerien a hoarie, n'eo ket evel lod a hoanta, gand o horn-boud skiltruz, ober d'on diskouarn ar pezh a reas sant Per da hini Malchus¹⁷... Ar zonadeg-mañ a oa c'hwek, klemmuz ha ker flour d'an diskouarn hag ar boulouz d'an daouarn.

Kleved a reed ivez, a wech da wech, moueziou garo ha trouz an armou. Klezeidi¹⁸ 'oant, o hedal beza galvet evid en em ganna dirag ar briñsed ha skuilla o gwad d'o dizenoui.

Erfin, evid diskouez peger berr eo ar vuhez ha gand pebez mall e tleer gounid anezi, e-kreiz an daol e oa eur penn maro.

*

An traou a yee en-dro. Al laboused fin, ar hlujiri, ar pauned, a bep seurt pesked, hag ar braog e-unan, a oa pe zebret, pe bet an tañva anezo : daou glezeiad a oa bet lazeta ha trêz taolet war leur ar zal en-devoa evet ar gwad : ar zonerien a hoarie dudiu, pa glevjod eur soner all... Eun aneval, ha, pa ranker rei dezañ e ano, eur pemoh, respet deoh ! a zeuas er gambr en eur wihal !

A-raog c'hoarzin, an dud a zo eno a zell ouz Galerius. Ar priñs, evel droug ennañ, a lavar :

« Petra a zellid an divergont-mañ ? »

« Ar maro ! », eme Dheoteknus, mignon brasa ar hezar.

« D'ar maro eta », eme ar priñs d'ar heginer a oa deredet buanna ma helle, - « d'ar maro, ha, peogwir en-deus c'hoant dond er zal, ra zeuio prim war eur plad ! »

Eun eur¹⁹ goude, edo ar pemoh a-bez war an daol.

« N'eo ket poaz ? », eme Halerius.

« Gwelit », eme ar heginer.

Poaz-mad e oa, alaouret ha kreunennet-kaer e gosteziou.

« B'az-peus divouzellet anezañ ?, a lavaras adarre Galerius ; « gwall-deo her havan. »

« Gwelit », eme ar heginer.

Digoret e oe ar pemoh... An diabarz anezañ a oa leun a fars, a zilzig, a wadagennou a roe naon ar gwel hepken anezo.

Dioklesian hag ar re all a zavas diwar o fluñvegou, evid strakal o daouarn. Rag morse n'o-devoa gwelet aoza eun heveleb tamm boued e ken berr amzer.

« Ne glaskin ket en em fougeal, eme Halerius. Va mignon Theoteknus eo en-deus va helennet war an dra-mañ, ha va heginer, diouz a welit, a ve mad da hoari keti-keta. »

Meuleudi a oe roet eta da Dheoteknus evid ar blijadur en-doa greet d'an oll. Dioklesian zoken a houlennas hag eun dra bennag en-doa c'hoant da gaoud.

Hemañ en-doa e hoant, eur pennad a oa, ha ne nahas ket.

« Impalaer galloudus, emezañ, lakait ahanon da houarnour e kêr Ankura. »

« Re eo kement-se, eme Zioklesian, rag he lignez n'eo ket uhel. »

Thoeteknus a zavas ar gwad d'e benn, rag ne gave ket êz kleved ar homzou-ze.

« Priñs, emezañ, kalz tud a vez izel e penn kenta o buhez hag a bign diwezatoh. C'hwi 'zo bet dister gwechall ha Galerius n'oa nemed eun diwaller chatal. »

Ar vuanegez hag ar gwin o-doa lakaet Theoteknus da brezeg evel-se, nemed gwelloh e vije bet dezañ derhel kloz draf e henou. Galerius a reas eur zell spontuz outañ :

« Diwaller chatal !, emezañ. Zoken ouz va zaol e teuez d'am goapaad ! Ya, diwaller chatal on bet,... ha chatal all am-eus c'hoaz ! War an taol ez i d'o gweled... Kemerit an den-mañ, servijerien,, hag hen stlapit d'an ourzien ! »

¹⁷ Malchus : ?

¹⁸ Klezeidi : tud hag a en em gann a-daoliou kelze, e latin : *gladiatores*.

¹⁹ eur : eurvez.

Mar doa bet Theoteknus genaoueg en dro-mañ, n'oa ket bet atao. Gouzoud a ree ez eus nebeud da fizioud war garantez an dud vraz ha ne deo leur o faleziou nemed skorn riskluz. Greet en-doa anaoudegez gand an daou aneval bleveg ; taolet en-doa dezo aliez peziou fonnuz a gig ; frotet en-doa o muzellou gand mel a roe dezo. Ouspenn, evid beza doujet ganto, en-doa meur a wech kemeret eur wialenn houarn, ruziet anezi en tan ha flemmet dezo o fri. Ar wialennig-se a hellas da dapa, etre m'e gased d'ar porz, hag he huzas dindan e vantell.

Setu Galerius, Dioklesian hag ar re all o tond da weled freuza ha debri o hompagnon.

An daou ourz a zo laosket. Klevet o-deus c'hwez ar hig : lammad a reont euz o zoull hag, en eur hrognal, e savont war o zreid a-dreñv. A-veh o-doe anavezet o mignon, ez ejont d'e gaoud, evel daou oan, o hortoz eun dra bennag hag, evel n'oa netra gand Theoteknus, e tistrojont losteg war-zu o zoull, en eur zelled a-zehou hag a-gleiz, evel evid goulenn perag e oant bet dizouchet.

An dra-ze ne blijas tamm da Halerius ; Isa a reas a-bouez penn Mikaour ha Didamall hag o brouda beteg ar gwad.

Kaer en-doa, Didamall a yeas d'e loj, eur hovad droug ennañ ; Mikaour a zentas gwelloh ; tostaad a reas gand kalz reuziou ; gwernia a reas ouspenn deg gwech, hag, erfin, edo e-keñver Theoteknus, dispak e skilfou.

Theoteknus, digeflusk-braz, a dennas e vazig a-zindan e vantell... Mikaour a loskas eur youhadenn ; gand eun taol pao e tiskaras daou pe dri servijer a oa war e hent, hag e redas d'e doull. Eno, a-berz an eil hag egile e savas kement ha kement a zoroh ma ne gredas den tostaad evid o zenna er-mêz.

« Gweled a rit, Dioklesian !, eme Dheoteknus. An ourzien o-unan a bleg dirazon. Piou 'ta gwelloh egedon-me a zeufe a-benn euz ar gristenien ? »

Barrad kounnar Galerius a oa tremenet, pe, da vihanna, troet e oa ouz e ourzien ha n'on dare perag ne reas ket o laza. Dioklesian a lavaras d'e vab-kaer :

« Stardig, kement-se, e oa koll Theoteknus evid eur ger eet euz e henou. Koulz e ve her pardoni. »

« Evel ma karot », eme ar hezar.

« Ha roet e vezo dezañ e houlenn ? », a lavaras adarre Dioklesian.

« Ya, eme Halerius. Plijoud a ra din e gomz ! An neb a oar doñvaad ourzien a vezo eur rener mad. »

Etre daou, e weljont eur vandennad vrini a zeue war-nij war-zu enno. An daou briñs a oa kredig-meurbed, evel an darn-vuia euz ar baganed.

« Ma nijont a-zehou deom, eme Zioklesian, e vo anvet Theoteknus da houarnour. »

Ar brini a dostaas hag a nijas a-zehou...

Theoteknus a oe eta anvet da vond da Ankura... Neuze ez ejod adarre ouz taol, nemed ar pemoh a-benn neuze a oa yen.

Trede pennad

An ostaleri

1. Theoteknus o prienti an heskinerez ; Davus.

Theoteknus, evitañ da gaoud mall da vond da Ankura, a ranke gedal eun devez bennag a-raog ober hent. Mar deus meur a dra diêz d'ar paour, evid diloja n'eo ket : evel ar velhouedenn e toug e di war e gein. An den pinvidig a zo red dezañ kezeg, tud, kirri, hag all !

Kement-se, ne falvezas ket d'ar gouarnour koll e amzer. Evel m'on-eus hel lavaret, kalz a gristenien a oa en Ankura ; an diêsa e oa o anaoud. Beva a reent mesk-ha-mesk gand yuzevien, paganed ; chom a reent war evez, rag ma vezent atao en aon euz eun heskinerez bennag. Deskibien e oant, eta, da Jezuz-Krist, 'med e kuz, evel Jozef ha Nikodem, ar re a zebelias Or Zalver.

Ar gouarnour en-doa eur sklavour koz, eun den dibikouz, leun a fallagriez, ha ne houlenne ket gwell eged noazoud d'an oll. Rag-se e plije d'e vestr ! Ne veze morse tamallet nemed war eun dra : re e kare e vanne. Aliez e oa bet koustet ker dezañ an tech divalo-ze ; e gein, dindan ar skourjez, a oa bet lakaet ruz, glaz, du ... hag an amzer e oa ar hemener a ranke peñselia meur a damm euz e grohenn. N'eus forz, Davus n'eo ket war furraad ez ee !

Theoteknus a halvas, eta, e sklavour :

« Davus, emezañ, ezomm am-eus euz da zaoulagad ha da ziskouarn. Kerz, em raog, da gêr-veur ar Halated ; taol evez ouz an dud ; red eo, pa zegouezin, ez-pe, da vihanna, eun dousenn kristenien da ziskulia din. Unan bennag euz ar re-ze a vo treitour, a werzo e vreudeur hag ez ay an traou endro ! Mar karez, ne stagi ket a ouroulerien ouz da houzoug ha ne ri ket eur vrae euz da henou. Da labour eo elmma falh an Ankou ha charread e garrigell, med hep trouz na gwigour... Eur ger c'hoaz ! Ma teu sehed dit, e houzout peleh e sav ar glandour ; Mar 'peus sehed gwin, ar gwella eo suna da vizied, rag, diouz ma ri, m'hen talvezo dit hag a ray ahanout eur spontaill brini ! Kee ! Setu aze arhant ! »

Davus en em lakaas en hent. Tridal a ree evel eur hi-chase laosket war dres ar had ; postur a oa ennañ der ma tlee beza dinask e-pad eun hanter-zizun.

III. Davus o tegouezoud en Ankura.

Eun abardaez eta, e weljod o tegouezoud e kêr Ankura eun den goloet a hwezenn hag a bouldrenn. Henez 'oa or gwaz !

Sklêr eo deoh n'edo ket or hredenn gristen tri-hant vloaz a oa war an douar heb ma vije anavezet unan bennag euz he gizioù gand ar baganed. Ar sklavour-mañ en-doa klevet lavared penaoz ar gristenien a zegemere mad ar veajourien, a zigore dezo dorjoud o ziez, a walhe o zreid hag o lakae da azeza ouz taol. An traou-ze oll a oa gwir ; rag, p'eo c'hoantaet gand Jezuz beza beajour, p'en-deus lavaret : "Ar pezh a rit d'an disterra euz an dud, din-me va-unan eo her grit²⁰", en eur ger, pa ne chomo ket eur banne dour yen, roet en ano Doue, heb e hobr, e oa deread e vije trugarezuz ar gristenien. Koulskoude, mar doa lavaret dezo beza leal hag eeun evel ar goulm, e tleent ivez beza evezieg evel an naer.

Davus ne ouie nemed an hanter euz ar gentel hag, azezet war eur mên e kostez ar ru, e hede ma teuje unan bennag d'e bedi da vond gantañ. Savet en-doa zoken eun nebeud e zae evid diskouez d'an dremenidi e dreid hag e zivesker. Me n'on dare hag o tostaad ouz an eienennou, hervez kuzul e vestr, en-doa o louzet, med a-dar-zur, ouspenn eur gwiskad fank ha poultrenn a oa warno.

Kaer en-doa ober arvestou ha selled flour ouz ar re a deue hag a yee, nikun ne ree van... Etre-daou, an noz a dostae, steredenn al labourer a bare a-benn neuze en neñvou, kel laouen ha ma'z oa teñval penn or hanfard. Rag e petra, mar plij, e soñje war e vên ? « An hini am degemero, emezañ, a vo eur hristen ; rag-se, henez a rankin da ziskuill da genta ». An treitour !... Pa welas ne dalveze netra gedal, e houlennas e peleh e kavje eun ostaleri hag e oe diskouezet dezañ ti Theodot.

III. An ostiz santel.

Etre m'ema Davus o vond war-zu ti Theodot, greom ivez anaoudegez gand an ostiz santel. Me ho ped, lenner kristen, da deurel evez ouz ar homzou a zo amañ war-lerh, rag tennet int a skridou eun den en-deus bevet gand ar merzer braz-se, hag a anzaou en-deus bet skoazell digantañ bep tro m'en-deus e bedet.

A-raog trehi ar vourrevien, emezañ, Theodot en-doa diskouezet e vertuz meur a wech ; a-raog mond d'ar hourenadeg, e oa stummet mad hag e ouie an oll grogou.

Da genta, e reas brezel d'e youlou fall ; ker mestr e oa dezañ m'en-doa gwir da gelenn ar re all. Morse ne glaskas tañva plijadurioù faoz ar bed ; morse ne oe na devet na skaotet gand tan hudur an orged.

Adaleg e yaouankiz e oa evel eur wezenn na vez ket lezet da ober re a goad, evid ma roio muioh a ze a frouez. Lavared a ree eo ar wrizienn genta euz ar zantelez kaoud eun dalh striz war an debri hag an eva, e tle eur hristen kastiza e gorv, deski dezañ diouered, hag e klev an êlez c'hwez-vad gand genou eun den a yun. « An ene, emezañ c'hoaz, a dle beza mestr en e di ha n'eo ket d'al lorchentez, d'ar vuanegez na da nikun euz ar gwall-siou sevel o mouez ha derhel ar penn uhella. »

Setu petra 'oa Theodot ; ma tastume danvez, n'her gree nemed evel pa vije mevel ar beorien, rag dezo e roe e beadra.

Meur a zen a dennas euz fank ar pehed dre e aliou mad ; meur a hini, yah a gorv 'med klañv a spered, a bareas dre e bedennou ; kalz a baganed zoken, kalz a yuzevien a oe sklêrijennet gantañ. Dindan e zillad dister a ostiz, en-doa eur galon eskob : « *Etenim cauponaris, præter morem, erat ei in vili habitu pro munere episcopali.* » Aliez e paree an dud o lakaad e zaouarn war o fenn, rag n'oa louzou ebed ken nerzuz hag e bedennou : « *suas eis preces pro medicina adhibens* ». Kaer en-doa rei, e vadou a greske atao hag atao ivez ez oa muioh distag diouto.

Erfin, tra vuzuduz ! Distrei a ree an dud diouz ar vezventi ! Latinad a rankan adarre, rag den ne gredfe ahanon ma ve skrivet an dra-mañ e brezoneg : « *et nimio vino deditos ab ebrietate reducebat* » ; ya, distrei a ree an dud diouz ar vezventi ! Pebez ostiz ! Pebez skwer d'an ostizien ! Ha ne vo mui nikun

²⁰ her grit : Aviel Sant Vaze : XXV^{ved} Pennad, 40^{ved} Koublad.

anezo kavet dellezeg euz ar veuleudi gaer-ze ! E galon a oa kalon eun eskob ! Evid ar binijenn, evel mez am-eus o komz anezi d'an ostizien ha d'ar gristenien all ! Koulskoude, dalhom soñj ; ne da ket ken abred gand ar preñved eur horv dizehet gand ar yun ; buannoh e savo euz ar bez eur horv skañvaet dre ar binijenn ; êsoh, ispisial, e tremeno dre zor striz ar baradoz eun den moannaet dre an diouer.

IV. Davus ha Theodot.

Davus, dre ma tostae ouz an ostaleri, a lavare ennañ e-unan : « Setu amañ amzer gollet evid va hevridi, rag n'eo ket dindan ar bodou-ilio e tiwan ar gristenien ». Sebezet oll e oe pa welas Theodot ; an doare anezañ a oa ken habask, ken izeleg, ker mad e peb giz ma kavas d'ar sklavour n'oa ket hennez a ouenn an dud all. - « Daoust, emezañ, hag hemañ a ve eur hristen ? Red eo din her gouzoud ! »... Evid kavoud gevier n'oa ket par da Zavus ha peurvuia o live kempenn walh.

« C'hwi, emezañ, eo Theodot ? »

« Ya », eme an ostiz.

« Va list da bokad d'ho torn, rag sur on e pokin da zorn eun den onest, onestoh zoken evid an dud oll euz kêr, rag nikun n'en-deus truez ouz eur beajour, ouz eur paour-kêz kristen. »

« Ba ! eme an ostiz, hag e welas dioustu pesort kristen a oa dirazañ ; amañ e viot koulz hag e forz peleh ; ho tispign a reot diouz ho yalh, ha me n'on ket boaz da gignad an dud. »

« O mez ! eme Zavus adarre, n'em-eus kavet den da walhi va zreid ! N'eus 'ta mui a zent er gêr-mañ ? », rag gouzoud a ree ivez e veze roet an ano a zent d'ar gristenien genta.

« Va mignon, eme Dheodot, n'eo ket, kredabl, gand ho treid e tebrit ; rag-se n'eus droug ebed. »

Ar sklavour en-doa stignet e stoker, o kredi e kouezje an ostiz e-barz, evel eur raz dall, ha diou wech e oa bet dizarbennet. Ne lavaras mui netra hag en em lakaas da zebri ha da eva.

Abaoe m'oa intañv, Thoedot en-doa fiziet e verh Veronig en eur voereb dezañ, anvet Thekuza, a chome en eul lodenn all euz kêr. Mall e oa dezañ mond d'he hlask. A-raog mond kuit, e lavaras da Viktor, e vevel : « Na rit kaoz ebed gand ar beajour a zo aze ; na lavarit ger re ebed dirazañ ; rag eur gaouiad eo ha, marteze, eun treitour. »

Viktor a blegas e benn evid lavared ya, ha Theodot a yeas gand e hent.

V. Marvailloù etre Davus ha Viktor

Lavared hag ober a zo daou dra. Aliez ez eom a-eneb d'or ger ; aliez, dioustu goude beza greet disklêriaduriou a feiz, a esperañs, a garantez, e nahom or feiz dre on oberou fall, e vougom tan ar garantez, ha n'eo mui on esperañs nemed eun eor torret a lez ol lestr paour da vond gand red an dour.

Mével Theodot a oa pell diouz beza eun den fall. Kristen e oa, kristen mad zoken, med eun tammig ez oa yaouank : n'en-doa nemed daou pe dri bloaz warn-ugent. Peogwir e vez ar horv keid-all oh ober e gresk, penaoz e teufe deom ar furnez e berr-amzer ? Eüruz an den a dri bloaz warn-ugent en-deus, ne lavaran ket, kavet an teñzor-ze, med en-deus youl d'e gaoud hag a glask anezañ a-zevri ! Nag a dud war an douar, a zo gwenn o bleo, a zo end-eeun o zreid er vag evid ober an treiz braz, ha n'ouzont ket c'hoaz evid petra int krouet !

Ma vije bet fur a-walh Viktor, en-dije sentet ouz e vestr, ha n'en-dije ket ankounac'haet penaoz, pa vevom gand tud dianavezet, ne dle ket ar galon beza war an teod, hogen an teod war ar galon. Viktor, greet e labour, a inouas hag a yeas da gavoud Davus, war zigarez gweled ha n'en-doa ket a ezomm euz a eun dra bennag.

Ar sklavour, ma hredit, n'oa ket warnañ doare eun aotrou braz ; rag-se, ar mevel n'en-devoe aon ebed evid farsal outañ. O weled, eta, ez oa goullonderet e voutailh gand or beajour, e lavaras :

« Ne da ket fall an eva ganeoh ; n'oh ket ker kreñv war ar chaoka. »

« Nann, eme Zavuz ; distard eo va dent hag arabad sebezi : er mogerioù koz e vez aliez mein laosk. »

« Petra a livirit euz ar gwin-ze ? Ha mad her havit-hu ? »

« Mad ! N'eo ket mad eo ! Dreist ! Distiñget ! me 'garfe kaoud seiz teod evid e veuli ha seiz genou evid eva anezañ. »

« Me 'gav din gand eur genou ez a buan a-walh ganeoh. »

« Ya, rag lipous e tiskenn ! A ! hemañ n'ema ket gantañ blaz ar vaz. »

« Penaoz ! gwin a zo hag a vez gantañ blaz ar heuneud ? »

« Ya, mignon paour, blaz ar geuneudenn, evel ma livirit. Ha n'eo ket eun druez, p'en-devez eun den skarzet mad e gorzailenn, glebiet ha freskaet neudennigou²¹ e galon hag, evid komz gwelloh, lakaet e galon a-bez da neuñv er gwin hag el levenez, ha n'eo ket eun druez gweled eur mestr o tond en eur hrozmolad, eur vaz gantañ, da zarhei warnoh ken na vez eet ho kein en ho kov, pe, gwasoh c'hoaz, ho kov en ho kein ! Hogen amañ n'eus riskl ebed ! Koulskoude, ez eus degouezet eur wall-dra ganen o tond en ti. Va zroad kleiz a zo stoket ouz an treuzou... C'hoarzin a rit, den yaouank ? »

« Ya, sur ! Petra ! Gwelloh e vije bet ganeoh steki ho fri ouz eur pres bennag ? »

« Kaer ho-peus goapaad, eun diougan fall eo, ha diwezatoh e welim ! Bremañ, va mignon, pa 'm-eus lavaret deoh e vez mein distard er mogerious koz, e houlennan ouzoh : petra a ro harp d'ar meinse ? »

« An ilio, peurvuia. »

« Ya, an ilio, an ilio benniget ! An dero a blij da Jupiter, al lore da Apollo, ar meurta da Venus : Hogen, etre ma vezo an ilio boket an ostaleriou, nag ar meurta, nag al lore, nag an dero, ne vezint par d'an ilio. Ilio koantig-oll, ilio kêz ! pa welan ahanout ouz eun ti e teu dour a levenez em daoulagad, dre ma kredan e kouezo gwin em genou. Alo, Viktor, n'em-eus mui danvez krañch : alo, evid starda va dent, degasit din eur voutaillad all. »

« N'on ket evid rei deoh. »

« Ha perag ? »

« Evel-se 'ma an urz en ti-mañ ; morse ne vez roet da beb unan nemed eur voutaillad evid ar pred. »

« Ha gwir ? »

« Ker gwir ha ma lavaran deoh. »

« Mekastor ! » eme Zavuz, o pehi evel ar baganed, - rag i eo tadou-koz an douerien ; an diaoulou hag ar baganed eo o-deus kavet langach spontuz ar malloziou : « Mekastor ! setu amañ avad eun abadenn ! N'em-bezo mui eur banne ! N'hellin ket ober eun tammig sao ? »

« Dour 'zo », eme Viktor.

« Dour !... Gwin am-bezo, hag am-bezo ! »

« Ar mestr a zivenn. »

« N'oar ket eta eo diouz ar verzverien e tenn e vrasa gounidegez ? »

« Gouzoud a ra petra 'ra ; skiant zoken en-deus evid ar re n'o-deus ket a-walh o-unan. »

« A dra zur, den yaouank, c'hwi 'zo o farsal. »

« N'emaon ket ! »

« N'ho-peus ket amañ eun daboulin, ma rin tro kêr evid embann an dra-mañ : selaouit hag e klevfot gwell a ze ! An ostiz Theodot ne ro ket ouspenn eur voutaillad win d'ar re a zeu d'e di ; an neb piou bennag a ve sehedig... »

« N'eus ezomm taboulin ebed ! an oll a oar kement-se ha, dre ma talh Theodot d'e her, ne deu morse den da derri e benn, o klask eil-bannea, nemed a-wechou eur beajour bennag eveldoh-hu. »

« M'hen douete ! Stoket em-boa va zroad kleiz ouz an treuzou... Setu amañ ar gwalleur a dlee degouezoud ganen. Med, den yaouank, c'hwi a blij din kenañ ; eun doare ho-peus euz ar re wella ; c'hwi 'zo eun den êz da gared. Va hoant eo paea eur banne deoh... ha ne hellin ket ? »

« Theodot a lavar ne dle ket eun ostiz nag eur mevel ostaleri eva gand ar veajourien. »

« Ba ! list Theodot ; roit din eur gouzougad. »

« Nann. »

« Eur bigorniad... eur weskenad²²... eun netra ! »

« Nann, nann. »

« Me Kastor perdat et disperdat ! Da vihanna, degasit eur c'hoari diñsou ma raim eun taoliad. »

²¹ neudennigou : neudennouigou.

²² eur weskenad : ?

Davus a houlenne diñsou, rag n'oa ano ebed c'hoaz a gartou nag a zominoiou.

« Theodot a lavar n'eus ket falla tra da zerhel en eun ostaleri eged ar binviou noazuz-se : lakaad a reont an dud da goll arhant, amzer ; boaza a reont d'ar vezventi ha da galz a zizurziou. »

« Koulskoude ez eus anezo e peb ostaleri ? »

« E peb ostaleri fall. »

« Ho mestr, eta, ne hoanta ket gweled kalz a dud war e dro ? »

« Eo, med tud onest hepken. »

« Evel-se ar vezverien n'int ket tud onest ? »

« Eo, mar deus²³ moh onest. »

« Hag ar hounidegez, evel ma laavren ? »

« N'eus ket en Ankura pinvidikoh den eged Theodot. »

« Selaouit ; den yaouank ! Evel ma'z on koz, em-eus gwelet meur a dra : gwelet em-eus fubu ker braz ha kelien, kelien ker braz ha filiped, filiped ker braz ha mouilhi, mouilhi ker braz ha dubeed, dubeed ker braz ha gwazi, gwazi ket braz ha... ha n'on dare petra ! Med biskoaz n'on bet ken souezet hag hirio. Unan ahanom on-daou n'ema ket en e skiant-vad ! Evid gouzoud pehini eo, setu amañ goulennou. M'ho tizfi ha kantifi²⁴ da respont mad. Ha n'eo ket ar gwin evid beza evet ? »

« Eo, med n'eo ket evid ober re govad. Greet eo evid diskenn, ha nann evid sevel d'ar penn. »

« Ha n'on ket libr da eva kement ha ma kirin ? »

« Eo, ken libr ha ma'z oh d'en em veuzi pe d'en em grouga. »

« Ne intentit ket va goulenn. Piou en-defe ar gwir da vired ouzin d'en em vezvi ? »

« M'ho-peus gwin en ho ti, ho pried, ho pugale, o-deus ar gwir-ze, ha den nemeto ; pa'z it d'an ostaleri, emaoch e dalh an ostiz. Hennez a dle gouzoud eo greet ar gwin evid tri zra : terri ar zehed, rei nerz, rei levenez d'an den ; hogen re a win ne dorr ket ar zehed, ne ro ket a nerz, ne ro ket a laouenidigez ; eva re a win eo eva terzienn, kounnar... Ha gwir eo kement-se ? »

« Ya, war hed tost. Med, Mekastor ! ha ni 'ta, a zo bugale ? An otiz, 'ta, a zo karget d'on diwall ha d'on dizon ? »

« Ya, p'en em gav gand tud direiz. E zlead eo, ha, ma n'her gra ket, e di n'eo mui eun ostaleri, hogen eun davarn. »

« Koll a ran va fenn ; luziet eo va spered ganef ! Eur ger c'hoaz ! Ma'z eus eun droug bennag oh en em vezvi, an droug ha n'eo ket d'ar mezhvier hepken ? »

« A zaou-hanter ema etre ar mezhvier hag an ostiz ; unan a zalh ar zah, egile a laka e-barz. Setu, peseurt kemm a zo ? »

Davus ne ouie petra da lavared ; kouezet e oa e veudig en e zorn. Petra 'vije bet, eta, m'en-dije gallet Viktor komz euz an ene, euz ar gaou spontuz a ra outañ ar vezventi ? Red eo tevel war an dra-ze, rag Davus a zo pagan, ha n'oa ket brao eñvel ar gwir Doue, p'edo an urz heskinerez stag ouz mogerioù kêr.

VI. Davus, Viktor ha Theodot.

O kleved komzou Viktor, ar sklavour a blegas e benn, a glozas e zaoulagad, evid dastum muih a sklêrijenn en e spered, hag en em lakaas da zoñjal.

En eun taol, e savas hag, en eur lipad eur veradenn win chomet er werenn, e lavaras :

« Kentoh em-be uzet bordou ar werenn-mañ gand va muzellou eged n'am-be eur gomz vad diganeoh. Sur on... Theodot a zo kristen, ha c'hwi ivez ! »

« Eur veuleudi vraz eo lavared ahanom ez oar sur, diouz on oberou, ez om kristenien. »

Kement-se, Viktor a skrijas, evel eun den, o kutuill bokedou, a laka e zorn war gein yen eun naer.

Petra 'oa ar beajour ?...Ha ne zeuje ket da ziskulia Theodot, Veronik, oll dud an ti ?... Dre ze, ha ne dajent ket oll d'ar maro ?...

Ar paour-kêz mevel, liou ar groug warnañ, a glaskas freuza e labour : ba ! emezañ, evid rei eur hovah gwin da eun den a zo dija boued an diaoul, hag eur pehed e ve ? Red eo din tremen dioutañ :

²³ mar deus : ma'z eus

²⁴ kantifi : disfizioud kant gwech.

« Ahanta, tad-koz, eme Viktor da Zavus, m'ho tesko da vreutaad ouzin ! Treh on, n'eo ket 'ta ? Koulskoude, an traou-ze a oa farserez ; petra 'vije bet eta ma vijen bet a-zevri ? Mond a ran da glask deoh gwella gwin a zo er hao, eur gwin c'hwez an hañv gantañ, liou tarz-an-deiz... eun dra da hlazeri eur galon dizeh... »

Hag ez eas d'ar hao.

« M'hen douete, eme Zavus... Ya, farserez !... Goude oll, n'oa ket gwall-stoket va zroad ouz an treujou. »

Ar voutaill a zeuas. Koz-Noe e oa, poultrennet, dantelezet gand gwiad kevnid. M'ho-peus gwelet eur velhwedenn oh astenn he herniel, evid tapa eun delienn hlaz ha tener, e welot ivez daoulagad Davus ; gand ar barr-levenez e teuent er-mêz euz e benn.

Eva a rejont o-daou, trinka meur a wech. Sunet honnez, Davus a houlennas eun all.

« Ha mar bezit mezo ? », eme Viktor.

« Ba ! ba ! kamarad ; morse n'on bet mezo e-pad ma vezen azezet. »

« Setu, eta, eur voutaillad all. »

Pa gavas d'ar mevel en-doa tremenet a-walh diouz ar beajour ha n'oa mui warnañ e-unan liou eur hristen, e lavaras :

« Alo, Davus, mall eo mond d'ar gwele ; Theodot ne zaleo mui ha n'eo ket brao deom beza tapet gantañ. »

« Blao, blao ! », eme ar sklavour a oa berraet e deod.

« Alo ! savit ! Theodot a zo erru... »

« Er ru... er ru », eme Zavus ; list Theodot er ru... »

Viktor a grogas e Davus evid e streina²⁵ d'e wele : Davus a hine, a stourme, a dape peg e troad an daol... Setu an nor o tigeri, ha Theodot o tegouezoud gand Veronik.

*

Eun taol a skoas e kalon Theodot pa welas an dizurz a oa en e di. Buan e pignas, a kasas Veronik d'he hambr hag eno, war e zaoulin, e reas e bedenn : « O va Doue, emezañ, c'hwi n'eo ket falvezet ganeoh genel en eun ostaleri ; gouzoud a reeh pegement a behejou a veze greet en tiez-se. Gwelloh ho-peus kavet genel en eur hraou e-kreiz anevaled eged e-touez mezverien. Pignet war venez Kalvar, n'ho-peus ket c'hoantaet eva gwin, a oa ennañ beradou mir. O va Doue, m'ho ped, dre ar zehed ho-peus gouzañvet evid paea mezventiou an dud, dre ar gwinegr ho-peus tañvaet hag a zegas ho teod, pardonit ar pehed a zo greet hirio em zi ; na bellait ket diouzim hoh êl mad ; diwezatoh me a vo mui war evez ! Bremañ, roit din sklêrijenn ma teuin da anaoud ar pez am-eus da ober evid brasa mad Viktor ha va zilvidigez va-unan. »

Diouz ar zent, lenner kristen, eo deom kemered skwer. Marteze ho-peus eur mevel, eur vatez, hag e vezit ouspenn eur wech nehet ganto dre na vezont ket atao direbech. Diwallit ! Gourdrouz, skandalad, lakaad an teod da strakal evel skourjez eur portezez, a zo traou êz ; ar pez a zo diêz eo tenna ar mad euz an droug ha, koulskoude, petra 'dalv deoh skandalad ma n'eo ket an dra-ze a glaskit ? M'en em zavit ouz ho mevel gand malloziou, ar pez, siwaz, a hoarvez gand meur a hini, penoaz e teuy hennez da zond war well ? Leuskel malloziou a zo strinka glaou beo a-zioh ho penn ; koueza a raint, ha piou a vezo skaotet ? Me 'gred, ne dleom morse difazia ar re all nemed goude pedi. Nag eñ a gav komzou c'hwek, an hini a deu bemdez da freskaad e vadiziant dre an dour benniget ha sin ar groaz, an hini na varhata ket ouz e Grouer hag Rouanez eur *Bater* hag eun *Ave Maria* !

Da houlou-deiz, ar Furnez a ra he zro, o klask tud dellezeg anezi ; m'he galvit, m'he degemerit, eh azezo hag e chomo war dreujou ho ti : *Qui de luce vigilaverit, assidentem eam foribus suis invenite*²⁶. Eur wech ma vez honnez en or heñver, eo êz goulenn kelennadurez diganti pa vez ezomm. Setu petra 'dalv ar bedenn-vintin greet a-zoare ; hepti ez om tud dall o ren tud dall ha, pa varnom on nesa, ez om evel sur d'en em varn on-unan.

*

²⁵ streina : stelja.

²⁶ *inveniet* : Levr ar Furnez VI^{ved} pennad ; 15^{ved} Koublad.

Theodot, greet e bedenn, a ziskennas evid gouzoud penaoz ha perag ez oa eet Viktor a-eneb an urz striz en-doa roet da chom heb mezvi den en e ostaleri.

N'oa ket boaz ar mevel paour da veza tapet e droug. Eur vez spontuz a oa kroget ennañ ha tehet e oa d'ar red diouz an ti.

Evid Davus, n'oa ket êz dezañ tehed. En em ledet e oa dindan an daol, heb damant d'e sternaj, da lavared eo, d'e zillad.

Tennet e oe ahano, kazeliel, kaset d'ar hraou hag astennet war eur vriad kolo. A-veh eno, en em lakaas da rohal evel eur morhoh.

Bremañ kalz a ostizien o-deus eur hiz all. P'o-devez mezvet eun den, ha pa n'hell mui bale, e vez taolet er-mêz, hag e ve glao, erh, skorn : ... n'eus forz, er-mêz ! da lipad pri ha da sklasi el leh ma karo ! Souezet on, e gwirionez, e ve kristenien ken didruez ouz ene ha korv o nesa. - « Al lezenn, emezo, 'zo kaoz deom. » - O ! tud fallagr, heuillit 'ta neuze al lezenn penn-da-benn !... Koulskoude on c'hoaz muioh souezet gand ar roulerien. Goude gweled ar pezh a zo greet dezo, setu-i adarre, eun devez bennag war-lerh, o vond da di an ostiz kriz ha digalon-ze ! Red e ve lavared e ve ar roulerien touellet, strobinellet, kelhiet, skoet gand droug-avel !

VI. Taolennou Veronik

Pa zistroas Theodot da gambr Veronik, edo ar verh yaouank, digor mad he daoulagad, o selled ouz taolennou a oa dianavez eviti, rag a-nevez staget e oant gand an ostiz.

A Rom eo e teuent.

Ar gristenien ahano o-doa savet pe, evid lavared gwell, o-doa toulet eur gêr dindan kêr heh-unan, hag eno e seblent o merzerien. Rom, eta, ouspenn ma'z eo fontet war mên sant Per, a zo ivez diazezet war eskern ar zent.

Evid laouennaad eul leh ken teñval hag a vo ker skeduz da zeiz ar varn, pa zavo buhez ar boultrenn venniget-se, ar gristenien o-doa livet war vogerioù a weler c'hoaz, ar Pastor mad, Lazar tennet euz ar bez, ha kalz traou all.

Taolennou Theodot a ziskoueze an tri den yaouank er forn horet, Daniel e-touez al leoned, ar profed Jonas, an hanter anezañ el lestr, an hanter all e genou eur pesk.

« Va merh, eme Dheodot, dre ma kresk ha ma tosta ar riskl, ez eo red e kreskfe on nerz. Ar poaniou, pa zoñjer enno a-raog ma tegouezont, a ro nebeutoh a spont hag a hlaz. Evel ar gurin ez int : pa darz en eun taol, ol laka da skrija ; p'on-eus gwelet a-raog ar houmoul duet gand an arne, ne reom ket kement a van... Sell piz ouz an teir daolenn-mañ ha ganto desk ivez tri zra : e tleom gouzañv pep tra kentoh eged nah or feiz, - e oar Doue diwall e zervijerien - hag ez eus eur vuhez all kaeroh eged homañ. N'eo ket heb gwir o-deus or breudeur a Rom lakaet ar skwerioù-mañ dirag on daoulagad, rag an diranted, evito da veza ker kriz, n'o-deus kavet netra gwasoh eged an tan, an dour, an anevaled gouez. Amañ e weli mignoned Doue treh d'an traou-ze oll. »

TAOLENN AN TRI DEN YAOUANK²⁷

« Sell ouz an daolenn genta. Ar roue Nabuchodonozor en-doa savet, e-keñver Babilon, en eun dachenn anvet Dura, eur skeudenn aour he-doa tri-ugent troatad uhelder. An oll, paour ha pinvidig, a dlee, d'an deiz merket, daoulina dirag ar skeudenn-ze hag heh azeuli dindan boan da veza taolet en eur forn horet. Pa veze an trompillou, an taboulinou, an oll vinviou o c'hoari eo e tleed daoulina.

« Tri den yaouank ne falvezas ket dezo plega d'an urz dizoue-ze. Kaset e oent dirag ar roue.

« Ha gwir eo, eme hemañ, ne azeulit ket on doueou ha va skeudenn aour ? Diwallit ! Pa glevot an trompillou, grit evel ar re all, pe ez eot er forn, ha peseurt doue a hellfe ho tenna ahano ? »

« Roue, eme ar re-mañ, n'on-eus netra da lavared deoh nemed ne azeulim ket ho toueou. An Doue gwirion a ray ahanom ar pezh a garo. »

²⁷ TAOLENN AN TRI DEN YAOUANK : Daniel, III^{ved} Pennad.

Kemeret e oent 'ta, ha liammet ha stlapet er forn gand o oll dillad. Ken nerzuz e oa an tan ma tevas ar re a oa tostaet ouz genou ar forn evid teurel e-barz Ananias, Mizaël hag Azarias. Ar re-mañ, avad, a valee er forn en eur veuli hag en eur bedi Doue. O mouez a zave beteg Nabuchodonozor hag e ofiserien.

« Ar roue, eta, a reas teurel er forn rousin, stoup, peg, koar, a bep seurt traou leskidig. Ar flamm a zavas beteg hanter-kant troatad a-zioh toull ar mên-gad hag, en eur droidellad, a vougas meur a hini. Med eun êl a oa e-keñver an tri den yaouank ; lakaad a reas da hweza eun avel ker fresk hag an hini a zav, diouz ar beure, diwar gliz ar prajeier, hag ar hantik a yee atao en-dro : »Êlez euz an Neñv, meulit Doue, meulit ha meulit-Hañ euz an eil kantved d'egile ! Glauf ha gliz, meulit Doue ! Tan ha tommder, meulit Doue ! Skorn ha yenienn, meulit Doue !... »

Ar roue, sebezet-oll, a dostaas hag a lavaras d'e ofiserien : « Daoust ha n'or-beus ket taolet tri den liammet e-kreiz an tan ? Bremañ, koulskoude, e welan pevar, diere ; hag unan anezo a zo heñvel ouz Mab Doue ! »

« Tennet e oent ahano... N'oa ket rostet eur vlevenn euz o fenn. »

« Setu aze, Veronik, petra 'welez war an daolenn genta. Na da ket da gaoud aon rag an tan ; e dalh Doue ema, hag e rank meuli e vestr ; ne hell devi nemed liammou servijerien Jezuz. »

« Fiziañs am-eus e Jezuz, eme Veronik. Ne houlennan burzud ebed evidon ; hag e teufe an tan da zevi al liammou a zalh va ene stag ouz va horv, me 'veulo ano va Zalver. »

Evidom-ni, kristenien, dalhom koun ez eus eun Nabuchodonozor all kalz gwasoh eged roue Babilon, an diaoul eo ; ez eus eur forn horet gand justis Doue, ha danvez an tan a zo eno, ar rousin, ar stoup, ar peg, ar hoar, eo or pehejou.

DLEAD EUN TAD HAG EUR VAMM GRISTEN

Theodot n'helle nag enoui na skuiza o rei kenteliou d'e verh muia-garet. Genou eun tad kristen a dle beza eun eienenn a vuhez evid e grouadur. Trist eo soñjal ez eus hirio kemend a dud na gomzont morse d'o bugale nag a Zoue nag euz ar baradoz, nag euz o ene. Mar deo dizeh genou an tad hag ar vamm, a beleh eta e redo an dour a roio nerz da wriziou ar plant yaouank-se ?

Arabad fazia ! E skol ar barrez²⁸ ne vez greet nemed degachi, ragachi, skriva, ober "chifr"²⁹ hag ivez eun tamm katekiz. Ar skol a zo atao eur binijenn evid ar vugale, dre ma n'hellont ket c'hoari, trei ha distrei, diouz o hoant, dre ma rankont deski traou dindan eñvor. Ken êz eo d'eur mesaer lakaad e zaout da beuri broen ha d'eur mestr lakaad ar baotred da zelaou e gomzou. Emaint dirazañ evel eur houlaouenn, a zo gleb he foughenn³⁰, ne grog nemeur, kaer 'zo tostaad anezi ouz an tan, a zo pikous ha ne ra nemed strakal ha divera... Ma teu, eta, ar mestr-se, hervez e zlead, da gomz euz an Aotrou Doue, ha don ez ay e gomzou e kalon ar vugale ? - Ne gredan ket !

Ar paotrezed 'zo ivez skuizuz beza war o zro. Kement-se, int sentusoh ha dougetoh da zeski o relijion. N'eus forz ! netra ne dalvezo mouez an tad pe ar vamm.

Ne houlennan ket diganto sarmoniou. Eur ger, eur gerig, eur wech an amzer ! Diskouezit d'ho vugale an heol, ar stered, ar mor ha komzit euz galloud Doue ; diskouezit dezo eur parkad ed ha komzit dezo euz e vadelez : kasit anezo da bedi ganeoh war beziou ho tud-koz, ha livirit ez eus eur vuhez all, ema an eskern er vered evel eun had en douar.

Tri pe bevar perag a zo atao e spered eur hrouadur. - « Perag e sent ouzin ar zaout, ar hezeg ?... Perag n'eo ket reun, med gloan a zo war gein ar penn-dañvad ?... Perag ne spont ket ar yar dirazon ?... Mil ha mil digarez a gavo eun tad kristen da zavel kalon e vab war-zu Doue, ha neuze, e gwirionez, e vezo e henou ar pez ma tle beza : eun eienenn a vuhez !

TAOLENN AR PROFED DANIEL³¹

²⁸ skol ar barrez : skol an "diaoul"

²⁹ ober "chifr" : galleg.

³⁰ he foughenn : he foughenn.

³¹ TAOLENN AR PROFED DANIEL : Daniel VI^{ved} Pennad.

Theodot, eta, a gendalhas da gelenn Veronik.

« Va merh, emezañ, en eil taolenn e welez Daniel e-kreiz al leoned.

« Ar profed-se a oa mignon d'an tri a oa bet stlapet en tan, 'med deut e oa war an oad.

« Gwelet en-devoa Nabuchodonozor, evel cheñchet en eun aneval e-pad seiz vloaz, o kousked er-mêz hag o peuri e-touez an ejened, rag Doue en-doa e skoet abalamour d'e lorchentez.

« Gwelet en-doa ivez Baltazar disliv, o krena e-kreiz eur banvez braz, pa zeuas eun dorn dianavez da skriva war ar voger e varnedigez e tri ger.

« Erfin, gwelet en-doa Darius o kemer Babilon.

« Ar roue-ze a lakaas c'hweh-ugent ofiser da ren e rouantelez. A-zioh ar re-ze ez oa tri all, kalz galloudusoh, ha Daniel a oa unan anezo : soñj ar roue, zoken, 'oa e lakaad e penn an oll vro.

Nemed an avi a heuill ar re a zo er hargou uhel hag a glask atao toulla dindano. Enebourien Daniel a douas e varo ; n'oant ket, avad, evid kaoud abeg er profed nemed abalamour d'e relijion. Dre ali an dud kenta euz ar vro e oe, eta, roet an urz-mañ : "An hini, en tregont devez kenta, a bedo eun doue, pe eun den bennag estreged ar roue e-unan, a vezo taolet d'al leoned". Darius ne welas ket edod o klask lindaga e vignon Daniel hag a zinas an urz.

« Koulskoude, ar profed a ouie n'hell ket kalon an den chom mad, ma tremen miz hep pedi. En em denna a reas en e di, digeri a reas warnañ ar prenecher a oa troet war-zu Jeruzalem hag eno, teir gwech bemdez, e taouline evid azeuli Doue. Meur a hini a oa ivez digor evid gouzoud petra 'raje ; gwelet e oe 'ta Daniel o pedi ha kaset dirag ar roue.

« Hemañ en-devoa c'hoant a-walh da vond a-eneb d'e her, med ne gredas ket : « Va mignon, emezañ, kenavezo ; an Doue a zervijit a ziwallo ahanoh. »

Daniel a oe taolet e toull al leoned, eur mên lakaet da holei an toull ha war ar mên-ze siell ar roue hag hini e ofiserien.

« Darius, distro d'e balez, ne zebras griñsenn ha n'hellas ket kousked. Mintin-mad e savas hag e redas da doull al leoned : « Daniel, emezañ, en eur ouela, Daniel, servijer an Doue beo, hag ho Toue en-deus miret ahanoh ? »

Daniel a respontas : « O ! roue, buhez hir deoh ! Doue en-deus degaset e êl ; klozet en-deus genou al leoned, ha n'o-deus greet droug ebed din. »

Darius, laouen-braz, a reas tenna Daniel euz ar foz ha teurel e-barz ar re o-doa e damallet, i, o bugale hag o gwragez³²... N'oant kouezet d'an traoñ ma oent tapet gand al leoned ha bruzunet o eskern. »

« Bolontez Doue ra vezo greet, eme Veronik, nemed gwell eo ganen beza devet eged roget ha dispennet gand an anevaled. War ar hrill, da vihanna, ar moged hag an tan a zo evel diou vantell a deufe d'am golei ha d'am huzad. Mez am-bo o veza diframmet dirag daoulagad kemend a dud. Me a houlenno digand ar Werhez ar hras da vervel en eur hiz all. »

« Ne gredan ket, eme Dheodot, ez-pe ezomm da gaoud aon ; Ankura, evid c'hoaz da vihanna, n'he-deus na tigr na leon, ha, goude oll, Doue a zelaouo da bedenn, rag dond a ra euz eur galon eeun. Ya, va merh, an dereadegez a zere d'an dud yaouank. Ar hlanded eo ar rozenn, an dereadegez eo an deliou glaz a laka ar rozenn kalz kaerroh hag, heb an deliou, ar boket e-unan a deu buan da hweñvi. »

Etre daou, an noz a yee en-dro ha mall e oa mond da ehana. Eur pluñveg kaer da lakaad dindan ar penn eo soñjou mad. A-dra-zur, marvaillou an ostiz hag e verh a oa mad. Kement-se, e oant trist eun nebeud, rag Theodot a hoantaas, evid laouennaad Veronik, he lakaad da gemered he zelenn da gana eur hantik.

Veronik ne ouie nemed senti. Setu, eta, ar herdin o tridal dindan he bizied, hag he mouez flour o sevel war-zu an neñv.

Lavared a reer gand gwirionez n'eus ket, evid an den, kaerroh ton eged mouez an hini a gar ; petra 've ivez dudiush da skouarn Doue eged kanaouenn eur verhig hlan ha dinam ? Erfin an delenn a baouezas ha ne glevjod mui ken trouz en ti nemed hini ar grilled war an oaled.

VIII. Davus ha Viktor adarre

³² teurel e-barz ar re o-doa e damallet, i, o bugale hag o gwragez : notenn gand Hirwaz : Ha kristen eo an dra-ze ?

Er bed-mañ, fall ha mad, emaoom mesk-ha-mesk. An disparti ne vo greet nemed da zeiz ar Varn ; neuze an deñved a yelo en tu dehou, ar bouhed en tu kleiz. Da hedal, aliez dindan an heveleb toenn en-deus Doue e vignoned hag an diaoul e sklavourien. Koulskoude, an eil rumm hag egile o-deus dija digand o mestr an tañva euz an amzer da zond : bugale Jezuz-Krist a zo ar peoh en o halon e-kreiz ar brasa trubuillou, tud an diaoul a zo atao debret o spered hag aliez gwallgaset ar horv-se e reont pep tra evitañ.

E-pad m'edo Theodot ha Veronik oh ehana, o êl mad en o heñver, Davus a zihunas. Re en-doa evet ha bremañ ez oa kroget an derzienn ennañ ; e henou a oa seh, e deod evel skarnilet. N'oa ket re deñval an noz ; kement-se, er hraou, ne weled berad. Ar sklavour a zigore e zaoulagad, o digore braz ha brasoh c'hoaz :

« Mekastor, emezañ, en desped d'an noz du-mañ, eun dra sklêr eo em-eus sehed hag e rankan kaoud dour. »

Loh a reas diwar e golo evid sevel ; e zivesker a dehe dindanañ.

« Allaz ! eme ar sklavour, n'on dare penaoz e oan deh, med bremañ e rankan beza mezo ! »

En em ruza a reas, koulskoude, ha krabanata amañ hag a-hont, o klask pe eur baillad dour pe eun digor bennag.

« Petra ?, emezañ, daoust hag eet e ve an oll likedou da foar ar brochou ? »

Koll a reas e boan hag, en eur goueza war e wele, e lavare :

« Gwedenn, ya, gwedenn sehed a oa lakaet gand Viktor en e win. O ! peur e houlaouo an deiz ? O ! ma vijes bet amañ, Viktor ! »

Viktor a oa tostoh dezañ eged na zoñje Davus.

Tebet e oa bet, evel ma ouzoh, gand aon rag gourdrouzou Theodot. Fall en-doa greet ha fall a ra ivez kalz peherien a zo ar gador-goves eur spontaill evito. Eur gwall-dra, e gwirionez, evid anzañ ez om dinerz hag ez om faziet ! Koueza er pehed a zo sempladurez, beva ennañ a zo fallagriez, kaoud douetañs a vadelez Doue ha lavared : Re vraz eo va faot ! », a zo beza dizakr. Pa vezim barnet, a-dra-zur, e vo pouezet or pehejou, med, ma pellaom diouz ar sakramantou, ar spontusa evidom e vo klevet an dra-mañ : « Perag ?, pa gleveh rebechou ho koustiañs, n'ho-peus ket klasket ar peoh hag ar pare el leh ma 'maint ? Daoust ha n'em-boa ket roet d'an Iliz ar galloud da derri ho chadennoù ? Daoust ha gand ar pab, an eskibien, peb beleg, zoken, n'edo ket alhweziou ar pardon hag ar baradoz ?... » En eur ger, pa gouezer er pehed, n'oar nemed ouz kalz, siwaz, a dud all ; pa chomer e-barz, e oar heñvel ouz an diaoulou. Pardon a houlenan diganeoh, lenner kristen ; marteze hoh inouan dre ma chom va istor a-dreuz... Nemed, evel ma welom e levr Job, pa zeu eun dra en e benn, ez eo diêz d'eun den krenna e lavar.

Viktor, eur wech er ru, ne ouie ket da beleh mond da glask lojeiz. Treuzi a reas Ankura ker buan ha pa vije bet archerien war e lerh ; erfin, pa ne gave ket gwelloh, ez eas en eun ostaleri en eur ruzia.

Kalz tud a oa eno ha kalz cholori ivez : eun dibab kanfarded a eve, a lakae an diñsou da ruill, a behe, a eve hag a hoarie adarre. An den yaouank n'en em gave ket en davarn-ze war e du ; mall en-doa da vond en eur horn distro bennag evid kousked. Anavezet e oe, avad, goapaet dre na hoantae ket riskla eur gwenneg bennag, troet ha distroet ker brao m'en em lakaas ivez d'ober eun taoliad ha da eva. Ne oe ket pell evid koll e dammig peadra ha, pa'z eas d'e hodell, e welas a-walh e ranke goulenn lojeiz en ano Doue pe vond er-mêz.

Setu-eñ adarre war ar ru. Ar gwin en-doa tommet e wad ha diresped-braz e komze outañ e-unan euz an tavarniou : « Tiez milliget, emezañ, n'eo ket tud, hogen gwaderezed a chom ennoh ! Suna a rit arhant, brud-vad, yehed an hini a ya d'ho kaoud ! Ho leurzi a zo greet gand poultrenn Sodom, ho mogerioù gand mein Babel, ho toenn gand skant an dragon braz Behemot ! »

Kalz traou a chaoke ha koun a zeue ivez dezañ euz a Zavus. - « Koz sklavour, emezañ, te a zo pennkaoz euz an traou-mañ ! Abalamour dit-te e kollan va flas, va arhant !...Ne ven ket pell... »

Etre daou ez ee gand ar ru heb gouzoud petra a ree hag en em gavas e-keñver ti Theodot. E vuaneged a yeas c'hoaz war gresk ha, trehet gand e imor, e lammes er porz, rag gouzoud a ree an doareou.

Davus a glevas eun trouz bennag hag a grias :

« Va den mad, deuit amañ ; dour din pe e varvin gand ar zehed ! »

« Ged eur pennad, eme Viktor... bremaig me da bareo ! »

Ha gand eur geuneudenn ez eas d'ar sklavour.

Digalon, teir gwech kriz ha digalon eo an hini a sko gand eun den koz, eur vaouez pe eur hrouadur ! Med petra ne reer ket diwar ar gwin ? Ar paour-kêz Davus en-devoe eur gwiskad bazadou.

« Sklavour fall, eme Viktor, blaz ar heuneud a oa ivez gand ar gwin az-poa evet deh hag ar blaz-se a bado ganez. Spier ha treitour, c'hoant az-poa da houzoud ha me a oa kristen ! Ya, kristen on ! Kee d'am diskulia pa giri, ma n'eo ket torret da zivesker. »

Eun dra vraz c'hoaz e oa da Viktor da lavared ez oa kristen, pa ree gwasoh eged eur pagan !... Erfin e skuizas o terhel hag e redas euz ar porz.

Davus a oa kaled ouz ar boan ha boaz da veza kannet. Kement-se, an dra-mañ a gavas stard. « Koz on, emezañ, med eun dra a ranakn da ober a-raog mond en douar : en em veñji euz Viktor. »

Lavared a ree ivez, evid en em frealzi : « Stoket em-boa va zroad kleiz ouz an treujou. Gwalleur a dlee degouezoud ganen, degouezet eo ! Peoh !... Parea a rin. »

Da houlou-deiz, mevelien Theodot a deuas d'ar hraou. Spontet e oent o weled e pe stad e oa bet lakaet ar beajour.

An ostiz a reas tenna Davus ahano hag e lakaad en eur gambrig a-zoare. E-unan e louzaouas Davus ha Veronik ivez a zeue, eur wech an amzer, da rei dour dezañ, da starda al lien a oa lakaet war e benn ha da lavared dezañ eur ger mad bennag. Ar sklavour, pa zante an dorn flour ha skañv-se war e dal, pa wele daoulagad birvidig ar werhez yaouank leun a druez hag a vadelez, a rede dour an anaoudegez-vad euz e zaoulagad e-unan. Ne lavare netra, nemed e goueled e galon edo ar zoñj-mañ : « N'eo ket eun dra am-eus da ober a-raog mervel, hogen daou : ar genta eo en em veñji euz Viktor ; an eil, kaoud an dro d'ober eur vad bennag evid Veronik. Va dorn a rofen evid laza Viktor ha va buhez evdi sikour Veronik. »

N'oa mui e galloud Davus ober e gevridi ha spia ar gristenien ; re bistiget e oa bet ! Ken nehet e oa war e wele, o hedall e vestr, ha ma vez eul labous, torret e askell, pa red warnañ ki ar chaseour.

Pevare pennad

Ar verzerien

I. Theoteknus en Ankura

Eun tri devez bennag goude an traou-mañ, e tegouezas Theoteknus en Ankura.

War varh e teue, soudarded en-dro dezañ. Ar baganed e zegemeras gand kalz a drouz hag a griken na darze o bouzellou : « Buhez hir d'ar gouarnour ! Maro d'ar gristenien ! » Theoteknus a vousec'hoarze hag a lavare : « Gedit eur pennad hag e welot ha me a oar labourad fonnuz ! »

Mond a reas d'e balez hag e reas an dro dezañ gand al lorh a vez en dud nevez-savet ha n'int ket boaz da veza er hargou. En em gavoud a reas ivez gand on anaoudegez koz ; gweled a reas Darius, anad mad c'hoaz warnañ an taoliou baz.

« Dres, emezañ, mall am-boa d'az kweled, med perag eo evel-se koeñvet da zremm ha da ziskouarn evel diou ormelenn a zo bet ar holvaz warno ? »

« Ne welit toud, eme Zavus ; dirusket eo ivez va divesker. Bet am-eus bet oh en em streina³³ amañ euz ti Theodot. »

« N'eus ken ? »

« Eo ! Glaharet eo ivez va hein. »

« Glaharet ? »

« Da lavared eo, ar glahar a zo em halon hag ar boan em hein. »

« Ha kredabl ez out bet kannet dre ma'z out bet o c'hoari da gi-dour ? »

« N'eo ket, mestr trugarezuz ! Med, pardon ! Va gouliou a boaz ahanon ; brevet on, torret on. »

« Ha kavet az-peus daouzeg kristen, evel ma lavaren dit ? »

« Nann, unan hepken, unan, avad, hag a dalv eun dousenn. Viktor, an hini en-deus va hannet. »

« N'out nemed eur gaouiad hag eun den fall ! Penaoz, an hini en-deus da gannet a zo kristen ? N'eus netra divennet strisoh e lezenn ar gristenien eged ober droug d'an nesa. »

« Viktor a zo kristen, pa lavaran deoh. »

« C'hoaz e rezono ! »

« Eo, Viktor a zo kristen ! an ostiz Theodot, avad, hag e verh, a zo paganed euz ar re wella. »

« N'az-peus ket ezomm da lavared din ! Eun dra sklêr ez eo pagan eun ostiz hag eur verh ostaleri. »

« Viktor a zo pagan... N'eo ket ! Kristen eo a falveze din lavared... Kristen eo ! Lakait anezañ d'ar maro ! »

« Sklavour mezhvier ha gaouiad ! Gwelloh eo din kastiza ahanout-te... Kee diouzin !

Eur vengleuz am-eus eur pennad ahalenn. Di ez i da denna mein ken na furrai, da lavared eo, ken na varvi. Ha, ma c'hoantaez tehed ahano, e vezi krouget ouz ar wezenn genta... Kee diouzin, pez divalo. »

Theoteknus a varne Viktor diouz e oberou ha ne gave ket dezañ e helle beza kristen eun den en-deus bazataet eur sklavour, peger fall bennag e oa ar sklavour-ze. Petra a dleom-ni, eta, da zoñjal euz kement a dud yaouank, ezeh zoken, a anzao int kristenien peogwir o gweler en-dro d'an ilizou, hag a ya koulskoude euz a di Doue da di an diaoul evid korvata ? Pa ne chomont ket en o fank en heñchou, evel an anevaled a gousk divez war o zeil, re enk eo dezo ti o herent ; gourdrouzet, kannet a-wechou e vez ar pried, ar vugale ; an tad hag ar vamm o-unan a glev d'an nebeuta komzou treñk. Petra 'livirim-ni a hevelb tud ?

Penaoz ne ve ket ivez e pep parrez eur vengleuz don evid dastum ar ganfarded-se ken na deufent da furraad ?

II. Viktor ha Theodot.

³³streina : dreina.

Koulskoude, e gwirionez, Viktor a oa kristen, ha keuz a oa savet gantañ ; nemed n'oa ket furroh en e geuz eged en e behed. Kaoud a reas dezañ n'helle ket paea e zle da Zoue nemed dre e verzerenti, ha dre eur verzerenti klasket gantañ e-unan : e hoant e oa mond da gaoud Theoteknus evid en em ziskulia e-unan ha bale raktal d'ar maro.

Koulskoude ne falvezas ket dezañ mond euz ar bed-mañ heb beza gwelet e vestr koz ha goulennet pardon digantañ. Mond a reas da di Theodot.

Ar zant a ouie n'eo ket eet eun den da fall war zigarez eur fazi pe zaou, ha n'eo ket eur merk e tleer dilezel eur park dre m'az eus savet e-barz eun drezenn deo. Beza ez eus douar ken nerzuz ma n'hall rei netra dister : ennañ e kavot pe louzeier druz pe eost pinvidig ; d'al labourer eo teurel evez. Kement-se, an ostiz a grenas pa lavaras Viktor e tlee klask ar verzerenti evid diskouez e geuz.

« Nann, nann, va mignon, eme an ostiz fur ; arabad eo tenti an Aotrou Doue. Or Zalver en-deus gedet e zeiz hag e eur ; goulennet en-deus, zoken, e vije pellaet dioutañ ar halur c'hwero en-doa da eva. Bevom dindan dorn Doue hag er stad a fell dezañ. Neuze, hag e vem er goueleh, evel ar Yuzevien, e kouezo bara deom euz an neñv, e strinko dour euz ar roh kaled hag ar houmoul a roy deom disheol. »

« Med, eme Viktor, evid rei bremañ skwer-vad ha ne dlean ket beza ar henta euz ar verzerien ? »

« Va mignon, Doue a oar gwelloc'h pere eo ar frouez dare. List anezañ e-unan da heja ar wezenn : an avalou dare a gouezo hag ar re hlaz a chomo war ar bod. Bezit izeleg, Viktor ! Eun dra gaer eo digeri hent war-zu ar baradoz ha lavared d'an êlez : “Me eo kannad kristenien Ankura, prientit an troniou skeduz”. N'eo ket kannad an neb a gar ; red eo beza galvet ha kaset gand an hini en-deus ar galloud. »

« A beleh 'ta, eme Viktor, e teu din ar c'hoant da veza merzeriet ? Ha n'eo ket a-berz Doue ? »

« Da genta, Viktor, ez it a-eneb an Aviel, rag lavared a ra : “ Pa viot o vond da gas ho prof d'an aoter, ma teu da zoñj deoh en-deus ho preur eun dra bennag ouzoh, kit da genta da gaoud ho preur, en em unanit gantañ ha neuze tostait ouz an aoter³⁴”. Ha c'hwi ho-peus c'hoant da dostaad ouz aoter an oan-Doue, en uhella euz an Neñvou, a-raog beza goulennet pardon digand Davus ! Kit d'e gaoud, ha, goude-ze, e vo gwelet. »

Viktor a hine. Koulskoude, n'helle ket mond a-eneb komzou Theodot hag e sentas.

III. Viktor ha Davus

Ar sklavour a oa en e vengleuz ; ne ziskolpe ket a vein, ma kredit.

O weled Viktor, e reas eur skrijadenn hag e krogas e troad eun horz.

« N'ho-pet aon ebed », eme Viktor. « N'on ket deut evid ober droug deoh, hogen evid goulenn pardon euz ar pezh am-boa greet en deiz all. »

« Petra eo pardoni ? » eme ar pagan.

« Ankounac'haad ha kared a-nevez. »

« Neuze kit gand hoh hent ; n'hellan nag ankounac'haad nag ho kared. »

« Pardoni din ! Ne ouien ket mad petra a reen ; evet em-boa re a win. »

« Ar gwin, eta, a oa kaoz ? »

« Ya, ar gwin milliget. »

« Mad ! Pardoni a ran, a-greiz-kalon, d'ar... gwin. Evid deoh-c'hwi, biken ! »

« Doue a zivenn ouz an den, a dremen ker buan, derhel kasoni hir ; an heol ne dle ket kuzad war or buanegez. »

« Selaouit, Viktor ! Hag ez afe an heol-ze a zo bremañ ouz va devi, da guzad da greisteiz, hag e hedfe hanternoz pe ziwezatoh, atao, atao e kuzo war vuanegez Davus. Ra gouezo ar gurun warnout, ha ra zebro ar chas ar pezh a chomo euz da eskern ! »

Viktor, o weled edo pell da hounid netra war galon Davus, a zistroas da Ankura, teñval-braz e benn.

IV. Maro Viktor

³⁴ neuze tostait ouz an aoter : Aviel Sant Vaze. V^{ved} pennad, 23^{ved} ha 24^{ved} Koublad.

Viktor a dreuze kêr evid mond da di Theodot, pa welas paigned o tevi esañs dirag aoter Apollo. Dioustu e lammas e galon en e greiz ha n'hellas ket mired da lavared : « Tud diskiant, petra a rit ? Ma ve eun den ken foll hag ho toueed, e ve war-eeun kaset d'ar maro. Ha n'ouzoh-hu ket a betra eo bet tamallet Apollo ? Ankounac'haet ho-peus-hu an dra euzuz a reas en enezenn Delos³⁵ ? »

Ar baganed a yeas droug enno o klevet ober rebechou d'o doue. War an taol o-dije diframmet e izili diouz Viktor ma ne vijent ket bet sur da gaoud Theoteknus a-du ganto. Kaset e oe Viktor dirag ar gouarnour.

« C'hwi eo, eta, eme hemañ, an hini a laka freuz en Ankura ! Kanna a rit an dud ha drougprezeg euz an doueed ! Pe e teuot da reisaad pe e kousto ker deoh. »

« Pardon am-eus goulennet digand an den am-boa gwallgaset. Evid ho toueed, fae a ran anezo. »

« Pe diwar ar gwinn pe diwar an dour e komzit evel-se ? »

« Diwar an dour, diwar dour ar vadeziant. »

« Den yaouank, evesait mad ! Buhez hir a hellit da gaoud c'hoaz, ha kalz a blijadur ; diwallit da skañvbenni ; kit da aoter Apollo, kinnig ezañs dezañ hag hiviziken diwallit gwelloc'h ho teod hag ho taouarn. »

« Ne ginnigin ezañs nemed d'an Doue gwirion. Grit a gerot ganen. »

Viktor a oe chadennet ha kaset d'ar prizon.

Lod euz ar baganed a hrozmole ; n'o-doa ket kavet Theoteknus droug a-walh. Lod all, o weled Viktor ker yaouank, a hoantaas e hounid.

« Red eo, emezo, plega d'ar gouarnour. A-hend-all, ho-pezo da houzañv poaniou garo ; lazet e viot hag ho korv taolet d'ar chas. Ouspenn, ho tammig peadra a vo kemeret, ho tud o-unan tamallet ; kañv war gañv a vo en o zouez. Ma vijeh bet koz, ho-pije leh da zisprizoud ar vuhez, med c'hwi e-kreiz ho prud, pa 'ma an oll blijadureziou dindan ho torn, mond war ho penn d'ar boan ha d'ar bez !... Sentit, Viktor, na vezit ket fall evidoh hoh-unan ! »

Hogen, pa oe ar fals-vignoned o rei o huzuliou, Theodot a zeuas ivez e-kreiz an noz d'ar prizon, rag, d'ar houlz-se, e oa kalz êsoh bizita ar brizonerien eged ne deo hirio. »

« Bennoz da Jezuz-Krist, gwir Aoue ha gwir zen ! » eme Dheodot oh anteral.

« Bennoz dezañ, eme Viktor ; ha benniget ra vo ivez an hini a zeu euz e berz ! O ! Theodot, vad a ra din ar gwel hepken ahanoh. Pegen trist, pegen teñval eo ar prizon-mañ ! Nag a hwez-fall a zo e-barz ! »

« Ar bed oll, va mab ker, ne deo nemed eur prizon braz, pa zoñjer er baradoz ; an deñvalijenn a zo amañ n'eo nemed eur skeudenn euz an noz a holo kement a sperejou n'ouzont ket anaoud or Zalver ; ho chadennou a zo skañv e-keñver ar re a stard an darnvuia euz an eneo ; pa livirin ar wirionez, n'eo ket ar bed hepken eur prizon, ar horv e-unan a zo eur golo pounner ha teñval evid an ene. Evuruz, eta, an hini a wel dorjou an daou brizon-ze o tigeri ! Eur zoñj a zeu din hag a ray vad deoh e-pad ma chomoh amañ : ha n'eo ket gwir, p'en-deus eun den da vond d'eur gouel pe d'eun eured bennag, e klask eul leh distro evid gwalhi e izili duet gand ar hwezenn, evid teurel e zillad fank ha gwiska e zae gaerra ? Ar prizon, Viktor, eo al leh ma tleit diwiska ennañ oll garantez ar bed hag en em gempenn evid gouel kaer ar baradoz. Ho-pet eur feiz kreñv hag e welot n'eo ket teñval eul leh ema ennañ ar Spered-Santel, ha ne glevot mui c'hwez-fall, med c'hwez-vad al lore, ema an êlez oh ober ganto ho kurunenn. »

« Gwir a livirit, Theodot, med ranna a ra va halon pa zoñjan e vezo va zad tamallet abalamour din. »

« A-raog mond d'en em ziskulia, e oa deoh evesaad. Eur wech an dorn war an alar, n'eus mui da zelled a-dreñv ; an douar-mañ, war ho lerh, a vo c'hoaz eun draonienn a wad hag a zaerou ; evidoh, sellit ouz ar vro n'eus mui enni na daerou nag anken. An Aviel a lavar : "An neb n'en-eus ket a gasoni ouz e dud, e vamm, hennez n'eo ket mad evidon-me³⁶". Hirio, pouezit ar homzou-ze ha grit diouto ; soñjit en ho Tad, en ho mamm ar Werhez, en ho preudeur, an êlez, ar zent, hag a zo en Neñv. »

Dre ma komze Theodot, ar gwad a rede freskoh e gwazied Viktor ; an nerz, ar peoh, a ziskenne en e galon.

« Bennoz deoh, emezañ ; startaet on ganeoh ! Theoteknus a hell va gervel pa garo. »

³⁵ an dra euzuz a reas en enezenn Delos : notenn gand an enebour : Ar baganed a lakae war o doueou, dreist-oll war Yaou, ar henta anezo, eru bern torfejou euzuz. En enez Delos eo e veze enoret dresit-oll, Apollo.

³⁶ hennez n'eo ket mad evidon-me : Aviel Sant Vaze X 37. Sant Lukaz XIV, 26.

E gwirionez, ne oe ket nemeur a zale. An tirant en-doa mall da houzoud pesort liou en-deus gwad eur hristen. Kement-se, ez eas adarre dre gaer da Viktor.

« Va mignon, emezañ, me 'gred n'ho-peus ket kollet hoh amzer er prizon hag ho-peus pouezet eno pep tra e balañs ar furnez. Diouz an tañva kenta e welit pegen pud eo frouezenn ar maro. »

« Furnez ar bed n'eo ket heñvel ouz furnez Doue. Va furnez-me eo disprizoud ar vuhez-mañ evid kaoud eur vuhez all. Evid ar frouezenn a gomzit anezi, mar deo pud da lod, da lod all n'eo ket. »

« Evel-se 'ta ne rit van, en despet d'ar vadelez am-eus evidoh ? »

« Pardonit din pa lavaran frêz ar wirionez. Ho madelez a zo fallagr ; komz brao a rit ha, koulskoude, n'oh nemed eur bleiz kuzet dindan krohenn eun oan. »

« Gwelloh eo eta ganez e taolfen ar hrohenn-ze evid diskouez va dent ha va skilfou ? Mad ! Selaou ! Bremañ n'eo mui an oan med ar bleiz a gomz ouzit. Pe e tevi ezañs dirag Apollo pe ne ri ket ? »

« Ne rin ket. »

Dioustu e oe lakaet Viktor etre daouarn ar vourrevien. E-pad pell amzer an den yaouank a chomas stard ; kaer o-doa an ivinou houarn dispenn anezañ, ar bizier brevi e izili, mevel Theodot ne fallgalone ket. Neuze, ar gristenien a oa o selled a lavare goustad etrezo : « Treh e vezo. Viktor eo e ano hag ar viktor en-devezo. »

Allaz, a-greiz-oll, e oe klevet Viktor o krial : « Ehanit ! Ehanit ! » Ar gristenien a skrijas, rag skrivet eo : “Ne vezo salvet nemed an hini en-devo kendalhet beteg ar fin³⁷”. Ar vourrevien a gredas edo Viktor o nah e feiz hag a ehanas raktal. Kaset e oe d'ar prizon hag, a-veh astennet war ar holo, e rentas e huanadenn diweza.

Ha Viktor, eta, a zo salvet, hag eñ a zo kollet ? Den n'her goar : “*dubium reliquens confessionis suae exitum*”.

V. Krizder ar baganed

Viktor a oa bet lazeta, med n'eo ket eur berad gwad a helle terri sehed Theoteknus hag hini e vignoned.

Or Zalver a lavare : “Deskit ganin ez on kuñv hag izel a galon³⁸”. E gwirionez, ar bed en-doa ezomm da zeski kement-se, rag a-veh e ouie zoken petra eo kaoud truez.

Souezet oh, lenner kristen, pa glevit komz euz al le en-doa greet Galerius da lakaad d'ar maro kement hini a zouge an ano a gristen ; ne gomprenit ket e ve eur galon kriz a-walh evid teurel ar bed oll er hañv, med dalhit soñj eo an diaoul en-doa c'hwezet e spered e kalonou an dud pagan. Kriz e oant, eta evel an ivern e-unan ! Hep komz euz mil tra all, setu amañ petra a zegoueze pa veze ganet eur hrouadur. Degaset e veze d'e dad ha lakaet en noaz dirag e dreid. Ma kave d'an tad n'oa ket kreñv ar hrouadur, ma ne blijete ket dezañ war eun digarez bennag, e tistroe e benn hag ez ee kuit. Ar paour-kêz bihan a veze neuze taolet war ar ru, aotreet da neb a garje e gemered ha, ma n'en-doa den ezomm anezañ, e ranke mervel. Ma plije ar hrouadur d'an tad, hemañ e gemere diwar an douar etre e zivreh hag e veze maget ar bugel. Bremañ e welit a beleh e teu ar ger “sevel bugale”, med gweled a rit ivez pegen dinatur e oa ar baganed, rag aliez ar hrouadur ne veze ket savet. Petra a helle respont barnerien d'eur hristen a lavaras dezo : « C'hwi eo a damall ahanon ; me ivez am-be gwir d'ho tamall, avad ! Hag unan a zo en ho touez na ve ket muntrer eur mab bennag dezañ ?... ». Goulenn truez digand ar baganed a oa eta goulenn truez digand an diaoul.

Kezar, brudet evid e galon-vad, a gave dezañ en-doa greet eur burzud a drugarez dre ma n'en-doa ket lazeta an oll zouarded en-doa prizoniet, med en-doa kavet e oa a-walh troha dezo o divreh³⁹ ! Evid Theoteknus, Satan a oa ivez en e greiz ha lavared a helled e oa c'hwezet ar soufr gand e henou hag e gresiou.

VI. Stad truezuz Kristenien Ankura

³⁷ an hini en-devo kendalhet beteg ar fin : Aviel Sant Vaze : XXIV^{ved} Pennad. 13^{ved} Koublad.

³⁸ Deskit ganin ez on kuñv hag izel a galon : Aviel Sant Vaze XI^{ved} Pennad. 29^{ved} Koublad.

³⁹ troha dezo o divreh : Notenn gand Hirwaz : e gwirionez e lakee troha o daouarn.

Kristenien Ankura, pa embanned dezo e rankent pe nah Jezuz-Krist pe vond d'ar maro, a ouie eta n'oa ket kement-se komzou goullo ha n'hellent esperoud netra war zigarez m'oant niveruz. Muia keuneud, brasa tantad !

Kalz anezo a dehas hag en em guzas er hoajou, er menezioù ha war ribl ar ster Halis. Ar vro-ze a oa gouez ha n'oa ket êz dond a-benn d'oa haoud dre eno. Med, siwaz, penaoz beva ? Pa veze debret ar bara, krignet ar gwrizioù louzou, e oa red adarre distrei da Ankura hag ar spierien a anaveze raktal an dud-se dre ma vezent disheñvelebet⁴⁰ oll ha duet gand an naon. Bemdez, eta, e veze tapet kristenien ha lakaet d'ar maro. Hervez al lezenn, ar horvou, stlapet er ruiou, a dlee chom eno da vreina pe da veza dispennet gand ar chas.

E-pad ma krene ar gristenien ha ma prenent kloz o dorojou, an ostiz santel a oa dispont. E di a oa digor ha d'an heol ha da zaoulagd an dud.

VII. Thoedot a chom dispont

E-pad an deiz, Theodot a valse euz an eil prizon d'egile, evid kennerzi e vreudeur ; e-pad an noz, e tastume korvou ar verzerien hag o bezie en e liorz.

E vignoned a zizalie anezañ diouz al labour-ze hag a lavare e tegouezje abred droug gantañ. Theodot ne ree van. « Penaoz, emezañ, me dilezel er ru ha gand chas korvou ker santel ? Ha n'ouzohu ket eo ar re-ze izili Jezuz-Krist, ilizou Doue ?... Evid gwir, riskl a zo ; med Tobi, gwechall, en-deus greet eveldon hag en-deus tennet warnañ ha war e vab bennoz an Aotrou Doue. Va dlead a ran ; n'em-eus aon ebed, ha c'hwi a gren muioh a-dreñv ho torojou alhweziet ha moraillet eged na ran-me o sebelia korvou ar zent. »

E gwirionez, Doue a ziwallas e zervijer kaloneg. Ar spierien a glaskas aliez gouzoud gand piou ha peleh ez ee korvou ar verzerien ; koll a rejont o foan : al loar, ar stered ; a bare hep diskulia Theodot.

VIII. Eun ostaleri deut da iliz

Eun enor braz evid eun ti eo e ve eur zant o chom e-barz ; an daol, an oaled, ar mein o-unan, a zo laouen en eun tiegez a feiz. Koulskoude, ti Theodot a dlee kaoud eun enor c'hoaz brasoh : Doue e-unan a ziskennas ennañ dre zakrifis santel an overenn ha setu amañ penaoz.

Lennet ho-peus, marteze, ar pezh a zegouezo pa vezo an Antekrist e-kreiz e vrud. Peb den a ranko dougen e ano. An dud dister a vo an ano-ze skrivet war o zal, evid ma vezo anad d'an oll ez int sklavourien ha tra an diaoul. An dud pinvidig a hello dre arhant mired dinamm o zal, med an ano a vo skrivet war o dorn. Neuze ivez e vo teuzet ar halurioù, al listri sakr, ha ganto e vezo greet eur skeudenn d'an drougspere. Ar skeudenn-ze a raio burzudou : flach, bale, prezeg a raio ha, dre eno, e lakay an darnvuia euz an dud da goll o feiz. Pa'z eor d'ar marhajoù, peb den, peb maouez, a ranko devi ezañs dirag ar skeudenn ; ar gwiniz, ar gwin hag an traou all a ranko ivez beza kinniget d'an diaoul evid beza evel gouestlet dezañ. Dre ze, e welit pegement e vezo gwasket ar wir gristenien ; n'hellint na gwerza na prena. A-veh ma hellint mond er-mêz euz o ziez, peogwir ne hoantaint ket dougen ano an aneval na war o zal na war o dorn.

Mad ! Theoteknus en-doa, a-benn neuze, kavet ar pezh a dlee ober an Antekrist. Kement tra a zeue da varhad Ankura a dlee beza kinniget d'an doueou faoz. Penaoz debri bara greet gand greun gouestlet da Zatan ? Penaoz, dreist-oll, gand ar gwiniz-se ober bara-kann evid an overenn ? Ha, diouz eun tu all, penaoz e kavje ar gristenien nerz da vond d'ar maro heb en em vaga gand korv or Zalver ?

Med Thodot a oa en Ankura ; pinvidig e oa, dispont e oa ivez. Perna a reas kalz greun war ar mêzioù ; maga a reas ar gristenien hag eñ ivez a roas ar bara hag ar gwin evid ar sakrifis santel.

Setu eta ti eun ostiz cheñchet en eun iliz : d'an traoñ e oa ostaleri hag e vaged ar horv ; d'an neh edo ti Doue hag e vaged an eneou.

⁴⁰ disheñvelebet : ger bet savet gand an oberour ? Lakaet e oant bet disheñvel gand o doare beva er hoajou.

IX. Istor vuzduz Konstantin

Theoteknus, gouarnour Ankura, en-dao mall da rei da anaoud da Halerius an oll zroug a ree d'ar gristenien.

Hogen hemañ, eur pennad a oa, ne zigounnare ket ; ne lavare mui nemed eur ger : « Lazit anezañ ! » E zervijerien a zeue d'e gaoud : « Priñs, emezo, ho mignoned a zo war varh o vond d'ar chase ». « Lazit anezañ ! », eme Halerius. « Priñs, emezo c'hoaz, dare eo lein ha yena a ra ar hig. » « Lazit anezañ ! », eme ar hezar.

Setu amañ penaoz ez oa bet skoet gand ar barrad kounnar-ze. Santez Helena, ker brudet diwezatoh dre he galloud hag he vertuziou, a oa a ligned izel. Hag e teufen da lakaad lorh en ostizien, e rankan hel lavared, honnez a oa merh d'eun ostiz. Eur mab he-doa, anvet Konstantin, hag hennez a oa dibabet gand Doue evid rei ar peoh d'an Iliz ha sevel dreist pep tra kroaz or Zalver. Konstantin a oa c'hoaz pagan ; kement-se, diwar neuze grasou Doue a bare warnañ. Eun den ez oa euz ar re gaerra ; kaloneg ez oa ivez ha, dre ze, deut mad da Zioklesian ha d'an oll zoudarded.

N'em-eus ket ezomm da lavared ne blijje ket kement-se da Halerius, ha ne glaske hemañ nemed kaoud e vuhez. Koulskoude, dre guz e ranke mond gand aon da denna warnañ re a zrougrañs.

Eun deiz edont oh ober brezel pa zeuas Sarmat⁴¹, eur ramz, a oa spontuz ar gwel hepken anezañ, da hoapaad arme Galerius ha da houlenn ober eur hrogad ouz an neb a garje. Den ne grede staga gantañ ; krena a ree ar zoudarded pa welent ar Sarmat oh astenn e zorn pounner hag e vreh nervennet-teo en eur lavared : « Alo, paotred, mar deus ganeoh, deuit ! An dorn-mañ n'en-deus c'hoaz kavet e bar : maill ar maro eo, eun troad beuz e-barz ! »

Galerius a yeas da gaoud Konstantin, rag c'hoant en-doa da lakaad e frigasa. Ar priñs yaouank a vousec'hoarzas, rag lenn a ree en e zaoulagad ar gasoni a zebre e spered. « Pe veo pe varo e vo degaset deoh ar ramz ? », eme Gonstantin. « Evel ma kerot », eme Halerius. Ar priñs a yeas, eta, d'an emgann ouz ar Sarmat.

Hemañ a oa ar hreñva, hogen Konstantin a oa kalz gweñvnoh e izili. Ar Sarmat a zistage taoliou pounner ha gouest da ranna eun den e daou damm. Ar priñs a droe, a zistroe, ha kleze e enebour ne ree nemed troha an avel. Ar Sarmat a skuizas buan ; divera a ree an dour diwarnañ ; mez en-doa ivez, rag gweled a ree a-walh n'edo ket Konstantin o klask e laza na zoken e bistiga.

Erfin, goude kalz taoliou gwenn, e vankas e zivesker dindanañ hag e kouezas a-stok e gorv. Ar priñs a grogas en e vleog hag e zegasas beteg Galerius.

« Lazit anezañ », eme hemañ.

« Salokras, eme Gonstantin. Din-me eo, ha ne vo ket lazet. »

Ar zoudarded a lavare ivez : « Dezañ eo ha dezañ eo ober euz e brizonier ar pezh a garo. »

« Eur paotr c'hwek out ! eme Gonstantin d'ar ramz. E gwirionez, da zorn eo maill ar maro, eun troad beuz e-barz ; med perag dond da hoari pa n'ouzout ket ober ? Bremañ e roan dit an dibab : distro, mar kerez, war-zu da genvroiz, ha setu amañ eur pezh aour, rag sehed az-peus gounezet. Pe mar kavez gwelloc'h, chom da vevel ganin-me. »

Ar Sarmat a oe souezet-braz, rag ne hede nemed ar maro. En em strinka a reas da dreid Konstantin hag e houlennas chom gantañ 'hed e vuhez.

N'oa eta, ken brud en arme, nemed euz a nerz hag a galon Konstantin.

Galerius, bouzaret e ziouskouarn o kleved rei dezañ meuleudi, a roas an urz d'e laza.

Ar priñs a oa war evez hag a dehas war varh e-pad an noz. Diouz ar mintin eo e tlee beza greet an taol ha Galerius, euz eur prenest, a hede ar vourrevien, pa welas ar Sarmat o tond er porz war loen du ar hezar e-unan.

« Kenavo, Galerius ; kenavo, muntrer, emezañ. Konstantin a zo pell a-benn bremañ ; n'hen tapi ket, na me kennebeud. » Hag e tehas d'an daoulamm.

Galerius a halvas soudarded hag ofiserien evid mond war o lerh, med, pa'z ejont d'ar marchosi, e weljont pesort labour en-doa greet ar Sarmat : trohet en-doa eun nervenn e garr peb-unan euz ar hezeg ; n'oad ket, eta, evid poursu Konstantin.

⁴¹ Sarmat : Notenn gand an oberour : Ar Sarmated a oa eur rummad euz pobl ar Hermaned, tadou-koz an Alamaned.

Bremañ e welit perag edo Galerius, eur pennad a oa, o kounnari ha perag n'oa ken ger en e henou nemed hemañ : »Lazit anezañ ».

X. Davus tennet euz e vengleuz

Koulskoude, pa lavaras Theoteknus d'ar hezar pegement a gristenien a oa bet distrujet a-benn neuze, e dal ken teñval a zeuas da sklêrraad.

« Eur servijer mad out, emezañ, ha va hoant eo ober eur blijadur bennag dit. Goulenn hag e vezi selaouet. »

« Priñs braz, eme Dheoteknus, inoui a ra tud Ankura o weled laza ar gristenien atao en heveleb doare. E Rom hag e meur a leh all ez eus tigred ha leoned evid o dispenn. Da hedall m'on-devo ivez anevaled gouez, plijet ganeoh rei din hoh ourz karet Mikaour. »

« Mikaour, eme Halerius, Mikaour, va gwella mignon !... Mad, kas anezañ ganez. »

Setu eta Mikaour lakaet en eur harr hag o tond da Ankura evid sikour ar vourrevien.

Koulskoude, e oa red eun den bennag evid diwall an ourz hag e voueta. Theoteknus a zeuas da zoñjal e Davus.

Ar sklavour koz a blijte d'e vestr dre ar homzou fentuz a veze atao en e henou hag, evitañ da veza war an oad, ne oa c'hoaz rabat ebed war e deod.

Ar gouarnour a yeas e-unan beteg ar vengleuz... Ar sklavour a oa gourvezet ha kousket.

« Davus, eme Dheoteknus, sav buan !... An tangwall a zo e ti da vestr ! »

Ar rouler koz a astennas e vreh :

« An tangwall ? emezañ. Ba ! amzer a zo... »

Ar gouarnour a grias adarre :

« Buan, buan ! Rag, evel n'eus ket a zour, e taoler ar gwin evid mouga an tan ! »

« Mekastor, eme Zavus, en eur ober eul lamm krenn, koll gwin evel-se !... »

Hag eh anavezias e vestr.

« Evid doare, eme Dheoteknus, ne rez ket nemeur a van euz tra da vestr ha n'out ket kreñv war al labour ? »

« Pardon, aotrou, eme Zavus ; ne gredan ket toulla re amañ. C'hwez an diaoul a zo gand ar mein ; dre ma skoan warno e teu tan anezo. Ha n'eo ket spontuz e strinkfe tan euz ar mein ? Me 'gred e labouran a-zioh puñs an ivern ha ne doullan ket re gand aon da goueza e-barz. »

« Deus ganen, eme ar gouarnour, rag eur garg uhel am-eus da rei dit. »

Davus a hine hag a hrozmole etre e zent :

« Eur garg uhel.... eur garg uhel... Kredabl, ar garg uhel-ze eo beza krouget ouz eur wezenn bennag. »

Selled a ree, eta, truezuz ouz an dero hag ar pin dre ma'z ee. Med dibistig e tegouezas e Ankura hag eno e oe kaset da gaoud Mikaour ha kenteliet war e vicher nevez.

Ar sklavour koz ne bade ket gand al lorh a oa ennañ. Mikaour a oe poket dezañ, kribet, diboultrennet e dreid. Erfin, daou vignon, ouz en em weled goude eun disparti hir, n'hellont ket ober muih a stad an eil ouz egile... Koulskoude, ne dleent ket chom pell mignoned.

XI. Veronik ha Theoteknus

Koulskoude, Theodot en em lakae re en heol evid tremen heb beza gwelet. Evel ma veze atao e-touez ar verzerien, m'her hleved o komz euz an Neñv, ar spierien a ziskredas warnañ hag a yeas d'e di.

Evid lavared ar wirionez penn-da-benn, plijoud a ree dezo ober enklask en ostaleriou rag, ma ne gavent peurvuia netra all, gwin da vihanna o-deveze marhad-mad hag, her gouzoud a rit, a beb amzer, an dud-se a vez laosket evel chas gand an diranted war-lerh ar re vad a zo bet atao kreñv war ar banneou.

Theodot n'edo ket er gêr ; eet e oa d'ar prizoniou hg e vevelien a lakaas ar gwin da zivera founnuz.

Goude beza torret o zehed, e reas ar spierien an neuz da ober enklask. Ne weljont netra nemed an taolennou ha ne ouient e giz ebed ar pezh a oa merket warno.

Ar gwasa eo n'helljod ket kuzad outo Veronik. Skoet e oent dre he hened hag he dereadegez.

Setu-i, eta, en distro, o lavared da Dheoteknus n'o-devoa kavet netra nemed eur verh yaouank, ar gaerra plah a oa en Ankura.

A-walh e oa ar ger-ze evid lakaad tan an orged da gregi e kalon ar gouarnour. Ne zaleas ket evid dond e-unan da weled Veronik.

N'oa den evid miroud outañ, hag ar verh yaouank, evid en em ziwall, n'he-doa nemed he el mad hag he fedennou. Hogen, o lenn istor ar verzerien, ho-peus gwelet gand pebez preder en-deus atao Doue beillet war e werherezed rag, e gwirionez, e briejou int. Lezet en-deus kemered o buhez ; n'en-deus ket lezet lemel diganto o enor. O glanded, lilienn an êlez ! Piou a intento biken pegen kaer out dirag daoulagad Doue ? Hebdout, n'eus vertuz ebed hag, en da skeud eh en em blij an oll vertuziou...

Hogen, setu amañ petra a zegouezas. Theoteknus a glaskas pokad da Veronik. Med trellet-tre e oe e zaoulagad gand Doue ha, pa gave dezañ e poke d'eur plah koant, e poke d'eun dra na zivunot biken.

Eur pod-houarn a oa e korn an oaled, unan koz ha goloet a zuad. Mad ! ar gouarnour, trellet eta e zaoulagad dre aotreadur Doue, a boke da hennez, e-leh pokad da Veronik a oa war he daoulin o pedi ; briata a ree ar pod hag e lavare dezañ e bep seurt komzou sod. N'oa ket bet pell amzer oh ober ar vicher ma'z oa e zaouarn, e zremm, e zillad zoken, goloet a zuad ; ne vije ket bet divalooch hag en-dije tremenet eun devez e-kreiz siminaliou Ankura.

Erfin ez eas kuit heb gouzoud netra, rag n'oa ket c'hoaz distrobinellet.

A-veh e oa en em gavet war ar ru ma chome an dud a-zav ha ma vodent en-dro dezañ : « Piou eo ar glaouer-ze ? », emezo. »Piou eo an anduillenn-ze ? »

« Heñvel eo ouz Theoteknus », eme unan.

« Theoteknus a oa droug ennañ o klevet an huerez ha ne intende netra... Hogen, en eun taol, e tigoras e zaoulagad hag e welas e pe seurt stad edo. Tehed a reas, mar gouie... Med, kaer en-doa redeg, ar geriou c'hwero a frome beteg e ziskouarn evel ar mein war-lerh eur hi.

Degouezet en e balez, eh en em guzas hag e chomas eun devez bennag hep kredi dond e kêr.

XII. Merzerenti Veronik. Paour-kêz Davus !

Anad e oa da Veronik e koustje dezi he buhez ar vez a oa kouezet war ar gouarnour. Prest e oa, eta. Maget e oa gand korv or Zalver ha nerzet dre gomzou he zad pa oe kaset d'ar prizon ha barnet d'ar maro.

Theoteknus a lakaas an daboulin da ober tro kêr evid dastum kalz tud, hag embannet e oe e tlee Veronik beza debret gand an ourz Mikaour. Ar genta 'oa da vervel evel-se ; ar baganed a oe mall ganto deredeg.

N'oa nemed eun den marteze e kêr ne ouie ket ar helou ; hennez 'oa Davus. Evel m'en-doa greet eur yun hir en e vengleuz, edo oh en em zihaoui, ha mezo e veze aliesoh eged e dro.

Theodot en-doa evid e verh eur garantez euz ar er denerra. Ar himiad a rannas e galon. Koulskoude, ar feiz a oe treh hag a volonteze vad e roe da Zoue an teñzor en-doa bet digand Doue.

Kas a reas d'ar prizon dillad kaerra e verh ; gwiska a reas anezi oll e gwenn.

« Da eured eo, Veronik, emezañ ; Jezuz a vo da bried ; kee laouen davetañ. »

*

D'an eur merket, Veronik a oa e-kreiz an dachenn, hag ar baganed, reñket war diri, o selled outi.

Setu roet an urz da zigeri kraou Mikaour, ha Davus a zentas. An ourz a dostaas en eur hrognal. Ar werhez yaouank a zaoulinas hag a reas sin ar Groaz.

Koulskoude, Davus a roas ivez eun taol-lagad evid gweled peseurt labour a raje e vignon... Eur skrijadenn spontuz a reas ; anaoud a reas Veronik, Veronik ker karet gantañ abaoe e abadenn gand Viktor.

« Mikaour, d'az toull ! », eme Zавus, gand eur vouez spontuz. Mikaour ne ree van hag a dostae.

« Mikaour, Mikaour, aneval ! »

An ourz a yee atao.

Davus a dapas eur gourgleze hag a zeuas buanna ma helle.

Re ziwedad e oa. An aneval a starde a-benn neuze etre e grabanou ar werhez yaouank hag a roge he gouzoug. Davus a zistagas eun taol kontell nerzuz e skouarn Mikaour hag ar gwad a strinkas druz.

Mikaour a ziskrogas diouz Veronik. Homañ a gouezas war an trêz ; he bleo fuillet a holoe he dremm hag he gwad a live he sae wenn. Davus a reas eur zell outi : « A ! Veronik, maro out ! », emezañ. Hag an dour a redas euz e zaoulagad.

Neuze e pellaas, med an ourz a oa bet gwallhloazet hag a yeas dezañ.

Etre daou hag e-pad m'edo an oll souezet, e weljod eun den o tiskenn e-kreiz an dachenn hag o tond war-zu Veronik. He hemered a reas etre e ziouvreh hag ez eas kuit ganti.

« Perag e sammit honnez ? », eme ar zoudard.

« Abalamour ma'z on he zad ! », eme Dheodot gand eur vouez nerzuz.

« He zad eo ! », eme ar baganed.

Hag e oe digoret hent d'an ostiz santel.

Goude oll, nehет e oad o klask gouzoud pe a-zevri pe evid c'hoari edo Davus ha Mikaour an eil e-keñver egile.

A-zevri edont. Mikaour a oa bet toullet e skouarn hag a gounnare ; Davus a hoantae veñji Veronik.

A-benn eur pennad e oent gwelet o ruill o-daou en eur bern. Kontell ha breh Davus a oa eet e genou Mikaour hag ivinou Mikaour e gwazied Davus. Edont o tenna o huanadenn diweza. Paour-kêz Davus !...

Koulskoude Theodot a zebellie e verh ha war ar bez e skrive ar ger-mañ hepken : "Christo", homañ a zo da Jezuz-Krist.

XIII. Theodot hag ar beleg koz Fronton

Bete vremañ, lenner kristen, em-eus lavaret kalz traou euz va fenn va-unan, evid rei gwelloc'h deoh da anaoud an heskinerez spontuz-se ma komzer ken aliez diwar e benn e buhez ar zent. Greet eo al labour a hoantaen, hag hiviziken ne rin nemed distrei e brezoneg ar pezh a gavan skrivet war batrom an ostizien.

Eun deg leo bennag diouz Ankura e oa eur vourh anvet Malos. Spered Doue a gasas di sant Theodot p'edod o vond da deurel er ster Halis ar pezh a chome euz ar merzer Valens, a oa bet, goude kalz a boaniou gouzañvet gantañ, kondaonet da veza devet ez-veo. Kas a reas gantañ ar relegou prisiuz-se.

Eur pennadig diouz ar vourh, e kavas kalz a dud e drugarekaas euz ar vad a ree d'ar re oll a veze er boan. Kristenien e oant, diskuillet gand o herent o-unan abalamour m'o-devoa diskaret aoter Diana ; ma'z oant libr, e oa gras da Dheodot, a zispignas kalz arhant evid o zenna euz ar prizon. An ostiz, laouen-braz ouz o gweled, o fedas da leina gantañ.

Kaoud a rejont war ribl ar ster, e-kichenn eur vougeo, eul letonenn goloet a vokedou ha disheoliet gand gwez braz. E-touez ar bokedou edo ar grilled o kana, hag, e deliou ar gwez, al laboused hañv. Eno 'ta e teujont da azeza. Theodot a gasas daou zen d'ar vourh evid pedi ar beleg da zond da zebri ganto ha da lavared ar pedennou.

Ar re-mañ a gavas e toull dor an iliz eur hoziad enoruz, a oa anad diouz ar peoh a oa war e zremm edo o pedi. Med setu chas o tond en eur harzal o klask kregi en daou veajour. An den koz a zeuas raktal, a bellaas ar chas hag a houlennas ouz on daou gannad ha kristenien e oant. Pedi a reas anezo da zond d'e di.

« Souezet on ganeoh, emezañ, rag huñvreet em-eus e-pad an noz, hag e kavas din gweled daou zen heñvel ouzoh-hu, hag e lavared din e tegasjent eun teñzor d'ar vro-mañ. »

« Eun teñzor, e gwirionez, on-eus, emezo ; rag ganeom ema an ostiz santel Theodot ha, mar kirit, e teuoh d'e weled. Med diskouezit deom ar beleg euz ar vourh-mañ. »

« Me va-unan eo », eme Fronton, rag an ano-ze a zouge. « Livirit d'ho preudeur dond d'am zi, rag n'eo ket brao e ve kristenien er hoajou p'o-deus mignonned ken tost all dezo. »

Fronton a yeas gand an daou gannad ; pokad a reas da Dheodot ha d'ar re all hag o fedas da zond d'e gêr.

« Nann, eme an ostiz ; mall eo din bizita ar re a zo er prizoniou. »

Goude lein, Theodot a lavaras d'ar beleg en eur vousc'hoarzin :

« Peger brao e ve al leh-mañ da lakad relegeier ar verzerien ! »

« Ya, eme Fronton, med, a-raog sevel ar chapel, e ve mad beza sur euz ar zent. »

« Bezit dineh, eme an ostiz. Savit atao eun iliz ; dizale ho-pezo relegeier ha, ma ne gredit ket, setu amañ va bizaoued, evel testeni euz ar pez a lavaran deoh. »

Goude kement-se, Theodot a zistroas da Ankura. An heskinerez, evel eur hren-douar, a ziskare pep tra er gêr-ze.

XIV. Merzerenti ar seiz gwerhez

Bez' e oa en Ankura seiz gwerhez, o-doa tehet, adaleg o yaouankiz, diouz ar bed, evid beva er hlanded hag en doujañs Doue.

Theoteknus, evel n'helle ket dond a-benn anezo, en-doa roet urz da dud lik da lakaad anezo da goll o enor. Ar gwasas kanfard euz ar vandenn a dennas en distro Thekuza, ar gosa euz ar gwerhez. Homañ en em strinkas d'e dreid en eur ouela, hag a lavaras : « Va mab, petra 'glaskit-hu ? Ne welit-hu ket ne chom netra ahanom dre ar gozni, ar yuniou, ar hleñvejou, ar poaniou gouzañvet ? Netra nemed eskern ! Ouspenn deg vloaz ha tri-ugent am-eus hag ar re all a zo ker koz ha me. Hag avi ho-pe euz ar horvou dizeh-mañ a zello a-veh outo ar brini pe breñved ar beziou ?... » Hag, en eur denna he gouel, e laoske da goueza he bleo gwenn.

Marteze, emezi c'hoaz, eo beo ho mamm hag he-deus ivez va oad. Dre zoujañs outi, na rit droug ebed deom ! »

An den yaounak, o klevet ar homzou-ze, a denereas e galon hag a ouelas e-unan. Oll ez ejont kuit.

Theoteknus, o veza klevet n'oa greet gaou ebed ouz ar seiz gwerhez, a gemeras eun hent all evid o lakaad da nah o feiz ; c'hoantaad a reas ober anezo servijerezed Diana ha Minerva.

Bep bloaz, paganed Ankura a yee en eur ster a-dost da walhi skeudennou an diou fals-doueez-se. , Hogen deut ez oa an deiz euz ar gouel.

Thekuza hag ar gwerhez all a oe lakaet en eur harr. Lamet e oa bet o dillad diganto, hag e rankent chom en o zav er harr, evid beza gwelet gand an oll ha kaoud muioh a ze a vez. War o lerh e teue ar skeudennou ; muzisianed a hoarie ar biniou hag an taboulinou ; merhed fall a ree dañsou milliget ha, war-lerh toud, e teue Theoteknus.

Kalz a dud a oa deredet evid selled ha goapaad ar seiz gwerhez. Koulskoude, o weled o hozni hag ar gouliou a oa c'hoaz war o horv, an darnvuia a dave ha, zoken, a skuille daerou.

Etre daou, Theodot a oa o pedi evid e voereb Thekuza hag ar gwerhez all, rag aon en-doa na deujent da fallgaloni. Eet e oa en eun ti paour, e-kichenn iliz ar batriarked, gand Polikronius, niz ivez da Dhekuza ; eur hristen all bennag a oa c'hoaz ganto. Edont oll war o daoulin o pedi, adaleg eiz eur beteg kresiteiz, pa zeuas mestrez an ti da lavared dezo edo beuzet ar gwerhez.

Theodot, o sevel e zaoulagad war-zu an neñv, a drugarekaas an Aotrou Doue hag a houlennas digand ar vaouez penaoz e oa tremenet pep tra. Homañ, hag a oa bet war al leh, a lavaras dezañ :

« Theoteknus, o houvoud⁴² a-walh pegement a vez o-devoa ar seiz gwerhez, a reas kinnig dezo dillad gwenn. Med ar re-mañ a ouie penaoz, o kemered an dillad-se, e oant sellet evel o tond da veza servijerezed Diana, ha ne rejont van ouz promesaou kaer ar gouarnour. Hemañ, erfin, skuiz ganto, a lakaas staga mein ouz o gouzoug hag o zeurel el lenn. Gand bagou int bet kaset eur pennadig ha stlapet eun daou-hant kammed bennag diouz ar ribl. »

⁴² o houvoud : galleg, a-viskoaz. Pa ouie...

XIV. Theodot o klask korvou ar seiz merzerez

Theodot a chomas en ti m'on-eus komzet anezañ, gand Polikronius ha Theokaris, mestr an ti, hag e klaskent penaoz e helljent tenna ar horvou euz al lenn.

Diouz an abardaez, eun den yaouank anvet Gliserius, hag a oa ivez kristen, a zeuas da lavared dezo en-doa ar gouarnour lakaet soudarded e-keñver al lenn evid diwall ar horvou.

An ostiz, eta, a oa nehet ; n'oa ket êz dezañ ober e daol abalamour d'ar gwardou-ze, hag ivez dre m'oa bet staget mein pounner ouz gouzoug ar gwerhez. Pellaad a reas, eta, diouz ar gristenien all, evid mond da bedi da iliz ar batriarked. Med ar baganed o-doa stanket an nor. Daoulina a reas er-mêz, an tosta ma hellas d'an aoter, hag e reas e bedenn.

Ahano, ez eas da iliz an Tadou. Stanket e oa ivez. Pedi a reas c'hoaz eno. O veza klevet kalz trouz en e gichenn, e kavas dezañ edod war e lerh, e tehas da di Theokaris, hag en em lakaas da gousked.

Neuze ar werhez Thekuza en em ziskouezas dezañ :

« Kousked a rez, va mab Theodot, emezi, ha n'az-peus preder ebed ahanom ! Ankounac'haet az-peus, 'ta, ar henteliou a rois dit e-pad da yaouankiz, evid ober eun den mad ahanout ? Neuze e kares ahanon evel eur vamm, med maro on hag e laoskez va horv da veza debret gand ar pesked ! A-benn daou zevez, ema an Emgann braz evidout. Sav, kee d'al lenn, hogen diwall diouz an treitour... »

Theodot a zavas ; lavared a reas e weledigez d'e vreudeur, hag oll en em lakjont da bedi evid goulenn digand Doiue ar hras d'helloud sebelia ar seiz gwerhez.

Da houlou-deiz, e kasjont Gliserius ha Theokaris war-zu al lenn evid ober euz zell rag, evel m'edo gouel Diana, e kave dezo e vije eet ar zoudarded e kêr evid kemered o flijadur. Med, siwaz, oll ez oant chomet. Red e oe, eta, tremen an deiz-se heb ober netra.

Pa zeuas an noz, ez ejont war-zu al lenn. Yunet o-doa evid tenna bennoz Doue warno ; filhier a oa ganto evid troha ar herdin a zalhe ar horvou maro. An noz a oa teñval ; n'oa na loar na stered.

E-kreiz an deñvalijenn e tegouezjont el leh ma veze lakaet an dorfetourien d'ar maro, leh spontuz na grede den tremen drezañ goude kuz-heol. Al leh-se a oa leun a bennou trohet savet war vizier, a eskern hag a gorrhou hnter-zevet. Krena a reent dre ma stokent ouz an traou euzuz-se, pa glevjont eur vouez o lavared :

« Tosta heb aon ebed, Theodot. »

Strafeuille e oent o klevet ar vouez-se hag e rejont sin ar groaz. Raktal e weljont eur groaz skeduz o para diouz tu ar zav-heol. Leun a levenez hag a spont, e kouezjont d'an daoulin evid azeuli Doue. Kenderhel a rejont da vale ha ken du ez oa an noz ma n'hellent ket en em weled an eil egile. Glao a ree ivez ha beh o-doa oh en em denna euz ar pri. Ehana a rejont adarre evid pedi : dioustu e weljont eur goulou a ziskoueze dezo o hent ha daou zen gwisket kaer, gwenn o bleo hag o baro, hag a lavaras :

« Kemer kalon, Theodot. An Aotrou Jezuz-Krist en-deus skrivet da ano e-touez re ar verzerien ha selaouet en-deus ar bedenn az-peus greet evid kaoud korvou ar gwerhez. Ni eo ar re a halver an Tadou. Kaoud a ri war al lenn sant Sosander, a zo o sponta ar zoudarded. Med ne dleez ket degas an treitour ganez... »

Evid gwir, ar merzer Sosander en em ziskouezas d'ar zoudarded, en e zorn eur hleze a strinke tan a bep tu. Ouspenn, glao hag avel spontuz a ree, kurun ivez ha luhed. Ar zoudarded a dehas hag a glaskas eul lochenn bennag. An avel a oa ker kreñv ma save an dour gantañ ha ma leze evel dizolo al leh m'edo korvou ar gwerhez.

Theodot, eta, hag e dud a drohas ar herdin, a dennas ar horvou, a zegasas anezo da iliz ar batriarked hag o douaras en he heñver gand kalz a azaouez. Setu amañ ano ar seiz gwerhez : Thekuza, Alexandra, Phaina, Euphrasia, Claudia, Matrona ha Julitta.

Pemved pennad

Merzerenti Theodot

I. Theodot gwerzet gand eun treitour

Antronoz, pa oe klevet e oa bet tennet ar horvou euz al lenn, e savas kalz trouz e kêr. Kalz tud a oe tamallet ha greet a bep seurt dezo evid ma teujent da anzao ar wirionez.

Polikronius, pa zeuas ar brud-se beteg ennañ, a hoantaas gouzoud drezañ e-unan. Kemered a reas dillad eun den diwar ar mêz hag ez eas war al leurgêr. Med anavezet e oe, kannet, hag edod o vond d'e gas d'ar maro. Neuze e tiskulias Theodot, hag e lavaras peleh e oa bet kuzet ar relegeier. Tennet e oent ahano ha devet.

Hennez e oa, eta, an treitour ma oa bet lavaret d'an ostiz teurel evez outañ ! Theodot, pell a oa, en-doa c'hoant d'en em ziskulia e-unan, hag her greet en-dije ma ne vije ket miret outañ. Pa glevas ar pezh en-doa greet Polikronius, e lavaras kenavezo d'e vreudeur :

« Pedit evidon, emezañ, ma vezin treh en emgann. »

E-unan e pedas pell amzer hag e houlennas ouz Doue ar peoh d'an Iliz. Pokad a reas d'an oll Gristenien gand kalz a zaerou hag e hourhemennas dezo rei e relegou d'ar beleg Fronton pa deuje euz a Velos, gand e vizaoued, evid o goulenn. Neuze e reas sin ar groaz hag e kerzas war-zu al lezvarn.

Kaoud a reas daou vignon dezañ, a reas o galloud evid e lakaad da dehel ; ne reas van.

O tond e-barz al lezvarn, e sellas en eur hoarzin ouz an tan, ouz an dour bero, ouz ar rojou hag an traou spontuz all a oa eno evid merzeria ar Gristenien. Theoteknus a lavaras dezañ e helle c'hoarzin, rag an tourmañchou-ze n'oant ket evitañ.

« Bez mignon din, emezañ, ha d'an impalaered. N'eus forz petra a hoantai az-pezo diganto ; lakaet e vezi da veleg Apollo hag ar veleien all a vezo dindanout ; evel mestr e vezi en Ankura. Evid kaoud enoriou ha danvez, n'az-peus nemed nah Jezuz staget ouz ar groaz gand Pilat er Jude ha distrei ar gristenien all diouz o follentez. Ma c'hoantaez aour hag arhant, az-pezo kement ha ma kiri. »

Ar baganed a oa eno a gave mad komzou Theoteknus hag a bede stard Theodot da zenti ouz e gomzou.

II. Merzerenti Theodot

Theodot a respontas d'ar gouarnour hag a reas eur brezegenn hir ha stard a-eneb an doueeou faos ; goude-ze, e reas eur veuleudi vraz euz or Zalver Jezuz-Krist.

Ar baganed a gounnare, a veleien a roge o dillad hag a stlape ar bokedou a oa war o fenn ; ar bobl a houlenne, en eur grial, maro an ostiz santel.

Theoteknus a reas, eta, e staga ouz ar marh-koad ha kalz a vourrevien, an eil war-lerh egile, a zispennas anezañ gand ivinou houarn. Taolet e oe gwinegr war e houliou ha lakaet an tan enno.

Ar merzer, pa glevas ar c'hwez euz e gig o tevi, a zistroas eun nebeud e benn hag e kredas ar gouarnour edo o vond da nah e feiz.

« Nann, eme Dheodot, med souezet on ganez. N'ouzout ket an doare da lakaad eun den da gaoud poan. Da vourrevien a zo bugale ; skuiza a reont dioustu. Degas da dud war va zro ha klask eun tourmant garo bennag, ma weli pegeid e hellan mond dre hras Jezuz-Krist. »

Theodeknus, evid e lakaad da devel, a reas terri e zent en e henou a-daoliou mein.

« Troh va zeod ivez, mar kerez, eme an ostiz. N'hen trohi ket berr a-walh evid na chomo eur pennad anezañ ganen ha gand ar pennad-se e veulin c'hoaz ano va Doue. »

Ar vourrevien a hweze hag a skuize o skei war Dheodot ; red e oe, eta, e gas d'ar prizon. Dre ma'z ee dre ar ruiou, e krie a-bouez-penn d'ar baganed en eur ziskouez e houliou :

« Anavezit hirio nerz Jezuz-Krist hag hini e zervijerien. »

Ar baganed a oa ker sebezet ma lavarent etrezo : « Theodot 'zo greet gand houarn ! »

Pemp devez e chomas er prizon. Neuze Theodeknus a halvas adarre an ostiz hag a lakaas e oll houliou da zigeri a-nevez ; ruillet e oe ar merzer war dammou podou torret, glaou beo en o zouez. Erfin, pa n'helled ket dond a-benn anezañ, e roas urz d'e zibenna.

Setu amañ ar bedenn a reas Theodot : « Aotrou Jezuz-Krist, Krouer an Neñv hag an douar, ho trugarekaad a ran dre ma halvit ahanon d'ho Rouantelez ; ho trugarekaad a ran dre ma roit din nerz a-walh evdi trehi an Naer ha flastra he fenn dezi⁴³. Roit ar peoh d'ho servijerien, torrit divreh enebourien hoh Iliz santel. »

« Amen », eme ar gristenien a oa eno o leñva.

« Na ouelit ket, eme Dheodot, hogen, breudeur garet, meulit Jezuz-Krist, a laka nerz em halon. Dizale e vezin er baradoz hag e pedin evidoh gand fiziañs. »

Neuze eh astennas e houzoug hag e oe dibennet.

Berniet e oe kalz keuneud evid devi ar horv. Hogen eur sklêrijenn ker braz a darzas ma ne grede den totaad evid lakaad an tan.

Theoteknus a roas urz d'ar zoudarded da chom war al leh evid diwall ar horv hag ar penn.

III. Penaoz e oe sebeliet korv sant Theodot.

Koulskoude, n'oa ket eun dra eeun e chomje heb beza sebeliet eur zant en-doa kemeret kemend a boan evid sebelia ar re all.

Ar beleg Fronton a zeuas da Ankura ; gantañ edo bizaoued Theodot hag e hoant a oa kaoud relegeier evel m'oa bet lavaret dezañ. Degaset en-doa, eta, gantañ eun azen, evid dougen an teñzor a glaske, hag, evid ober an neuz da ober eur gevridi bennag, en-doa lakaet eur banerad gwin koz e manikinou an azen.

Hogen degouezoud a reas, dre aotreadur Doue, e teuas an azen, er penn kenta euz an noz, da goueza dre skuizder, dindan e zamm, e-kichenn ar heuneud berniet evid devi korv ar zant. Ar zoudarded a oa eno, heb anaoud ar beleg, e bedas da chom ganto e-pad an noz hag a lavaras e vije bravoh eno eged en ostaleri ebed. Savet o-doa eul lochenn gand bodou haleg ha raoskl ha greet o-doa tan. Evel m'oa dare koan, e pedjont Fronton da zebri ha da eva ganto.

Hen ober a reas ha, d'e dro, e roas dezo euz e win. Ar gwin-ze a oa ker mad ma teuas c'hoant dezo da gaoud eur banne all. Unan, dreist-oll, a houlennas eur banne sonn, evid ankounac'haad, emezañ, an taoliou en-doa bet dre n'en-doa ket diwallet mad ar merhed a oa bet taolet el lenn.

« Diwall, eme eun all, na ev ket re, rag kannet e vezi adarre mar bez laeret diganeom an *den-houarn*. »

« Allaz, eme Fronton, n'on ket diviner ha n'ouzon ket petra eo ar merhed-se taolet el lenn, na petra eo an den-houarn. Livirit din, mar plij, petra eo an den-houarn, pe e kredin emaoñ o klask ober goap ahanon. »

Eun trede soudard a zekas neuze dezañ petra 'oa degouezet gand ar seiz gwerhez, ha penaoz an ostiz Theodot en-doa tennet anezo euz al lenn.

« Theodot e-unan, emezañ c'hoaz, a halvom an den-houarn, rag ar vourrevien o-deus skoet war e gorv evel war eun annev hag an den-ze ne ree ket, kennebeud, muioh a van eged eun annev. Theoteknus en-deus barnet anezañ da veza dibennet ha devet, ha ni a zo o tiwall e gorv gand aon na ve laeret gand ar gristenien. »

Fronton a ouie, eta, edo en e gichenn, war ar bern keuneud, korv santel ar merzer goloet gand bodou gwez ha deliou. Trugarekaad a reas Doue hag e reas sioul e bedenn.

Ober a reas an neuz da gousked. Ar zoudarded n'helljont ket trehi war an dentasion hag a yeas adarre d'ar gwin ; ne oe ken ehan nemed pa n'oa mui da zivera ha prest e teujont da gousked pounner evel an dud hanter-vezo.

Fronton a zavas, a gemeras korv ar merzer, a lakaas dezañ e vizaoued hag her sammas war e azen. Goude-ze, e lakaas adarre ar gwez hag an deliou kempenn en o leh, gand aon na deuje eur soudard

⁴³ flastra he fenn dezi : gourel eo "Naer" e gwirionez.

bennag da zihuna re abred. Neuze e tistroas da Valos, d'al leh m'en-doa debret ennañ eur pred gand ar gristenien. Eno e oe sebeliet ar merzer ha savet eun iliz en e enor.

Eun den anvet Nilus en-deus skrivet merzerenti sant Theodot, ha setu amañ e gomzou diweza :

« Me, Nilus, am-eus skrivet an traou kaer-mañ deoh. Ar wirionez am-eus lavaret, rag anavezet am-eus bet sant Theodot ha gantañ on bet er prizon. Ra vezin ivez gantañ e baradoz Doue, gantañ ha gand an oll zent, dre hras Jezuz-Krist, meulet ra vezo euz an eil kantved d'egile ! Amen. »